


Mengleuzioù pistrius e Breizh




Aurélie Calmet


Groñvel : 1.400 annezad. Imerys : ur sifr aferioù eus 3,8 miliard a euroioù. Bras-meurbet eo pouez ar mengleuziañ ramzel war gumun Groñvel e Kreiz-Breizh. Ha war vrasaat e ya c'hoazh : nevez zo he deus bet un aotre evit digeriñ ur poull ouzhpenn, un toull bras-divent a 80 metrad donder.

Diouzh he zu emañ an embregerezh etrevroadel o kuzhat efedoù gwirion ar mengleuziañ. Betek lavaret n'he deus efed ebet. Evit mont betek penn ar wirionez he deus fellet da *Splann !* ober dielfennadurioù hon-unan ha prouet eo bet ar c'hontrol. E naoz ar stêr ez eo tolpet ar metaloù pounner, ha betek 60 gwech al live dave.

10 €
Embannet e miz Meurzh 2025




9 782959 026263




ALC'HWEZ

 RAKTRES ASTENN

 LECH LEMEL

 TAKAD GLEB

 TAKAD GWAREZIÑ AL LECH DA DAPOLIT DOUR MAT DA EVAN E MEZOUE



war-zu
GLOMEL

QUERMEUR

POULL1

TOKAN
pistrius
a bret

SABES

STOKAN
dilerc'hioù
sec'h pistrius

Tennad -
test

LABOURA-
DEG trc'tañ
arc'hailh

CHAOSER KOZH
lastez pistrius enduaret

POULDÙ -DILAVIÑ

LEC'H
DISTAGAN

RUZELL
AR C'HRAZIUS

STANK AR C'HRAZIUS

WAR-ZU
MIRVA
NATUR
RANNVROEL

CRAZIUS

Mengleuzioù pistrius e Breizh

Enklask embannet e miz Du 2024

Groñvel : 1.400 annezad. Imerys : ur sifr aferioù eus 3,8 miliard a euroioù. Bras-meurbet eo pouez ar mengleuziañ ramzel war gumun Groñvel e Kreiz-Breizh. Ha war vrasaat e ya c'hoazh : nevez zo he deus bet un aotre evit digeriñ ur poull ouzhpenn, un toull bras-divent a 80 metrad donder evit gellet tennañ an andalouzit, un danvez a zalc'h ouzh temperadurioù uhel-kenañ, hag implijet evit sevel fornioù industriel, e-touez traoù all.

N'eo ket souezh m'eo bet roet asant ar pennadurezhioù, dre ma klot gant reneveziñ ar mengleuziañ evel ma fell d'ar gouarnamant. Heuliet eo a-dost an teuliad-se, koulz gant Imerys ha gant hec'h enebourien, rak talvoudus eo evit tud pell-mat diouzh Breizh.

Diouzh he zu emañ an embregerezh etrevroadel o kuzhat efedoù gwirion ar mengleuziañ, oc'h implijout geriennoù daou-duek, en ur venegiñ stad biologel a-zoare lec'h ma kaver saotradur kimiek. Betek lavaret n'he deus efed ebet. Evit mont betek penn ar wirionez he deus fellet da Splann ! ober dielfennadurioù hon-unan ha prouet eo bet ar c'hontrol. E naoz ar stêr ez eo tolpet ar metaloù pounner, ha betek 60 gwech al live dave.

Annezidi zo o deus bet klasket stourm, met strizh eo dezho o frankiz, dre m'eo stag da vat kumun Groñvel diouzh Imerys. N'hell den eno ober hepto, implijerez eo an embregerezh, hag arc'hantaouiñ a ra ar c'hevredigezhioù sport, re an endro, ha reiñ a ra ur vro d'an tiriad.

Meur a ard a vez dispaket gant Imerys evit reiñ diouti skeudenn un embregerezh familh, e penn a-raok ar mengleuziañ « made in France ». Padal n'eo e gwirionez nemet un impalaeriezh finañs perc'hennet gant kevranneien e penn ur fortun vat a vilionoù euroioù.

War greskiñ e ya an enebiezh ha gwelusoc'h-gwelusañ eo. Ur vanifestadeg a-enep digoradur pevare poull mengleuz Groñvel zo bet dalc'het d'an 23 a viz Du 2024. Heuliet eo a-dost seurt darvoud gant Imerys.

Ur stourm aet da bennvad a c'hellfe kaout efedoù war ar raktres mengleuz bras-meurbed mengleuziañ litiom e departamant an Allier douget gant Imerys. Met ivez war hollad adlañs ar mengleuziañ er Frañs a-bezh. E Breizh peurgetket, p'eo lakaet da terra incognita gant posterien arc'hant zo er broioù estren koulskoude.

Tri goulenn aotre ergerzhout war 42 kumun eus Breizh zo bet fiziet gant Breizh Ressources a glask metaloù rouez ha prizius. Un difrae boulc'het didrouz-kaer gant un embregerezh start-up a-orin eus ar C'hanada, ha renet gant ur gwir klasker aour.

Celia Izoard, Morgan Large, Catherine Le Gall

LODENN 1

GANT MENGLEUZ IMERYS EZ EO KONTAMMET AR MIRVA NATUREL

..... pajenn 7

Ha p'emañ ar Stad o paouez reiñ aotre d'an embregerezh da doullañ ur poull eztennañ nevez e Groñvel, setu m'eo dezrevellet disoc'hoù dielfennadurioù bet goulnet gant *Splann* !. Kontammet eo endro brasañ mengleuz digor er Frañs gant metaloù pistrius.

LODENN 2

EMAÑ IMERYS O TERRIÑ AN DEMOKRATELEZH LEC'HEL

..... pajenn 19

E Groñvel eo ledet tamm-ha-tamm levezon ar gompagnunezh Imerys, en ur glask reiñ outi hec'h-unan ur skeudenn pozitivel, kement ha lakaat an dud da asantiñ ouzh he mengleuz andalouzit. Met krog eo an daolenn da deñvalaat diwar taolioù kreñv enebiezh.

LODENN 3

AN EMBREGEREZH IMERYS EMAÑ O C'HOUNIT UN TOULLAD ARC'HANT

..... pajenn 29

En tu all d'ar skeudenn a embregerezh familh ez eo Imerys Groñvel unan eus ad-embregerezhioù un impalaeriezh finañsel gwall ledan. Pell eo neuze ar pennoù-bras diouzh ar reuz sokial, pa c'hell ar renerien gounit milionoù a euroioù a-drugarez d'ar min.

LODENN 4

KEITH BARRON : UN INDIANA JONES O KLASK AOUR E BREIZH

..... pajenn 37

E 2023 e oa bet ar start-up Breizh Ressources o fiziañ tri goulenn aotre mengleuziañ war 42 gumun. An embregerezh emañ gant ar spi kavout aour hag un daou-ugent maenad all. En tu all d'an embregerezh e kaver ur geologour klasker aour, hag un embregerezh Kanadian.

LODENN 5

AN EMBREGEREZH MENGLEUZIAÑ DIDROUSAÑ A VEZ ER C'HORNÔG

..... pajenn 45

Tri aotre dibar enklaskoù mengleuziañ (PERM) zo bet fiziet e Breizh gant an embregerezh Breizh Ressources. Ha daoust m'eo dallet trowardroioù ar raktres, en em vodet eo ar geodedourien evit mirout ma vefe kaset al labourioù war-raok.

Bouest du

Respontet eo bet dre skrid deomp gant Imerys diwar-benn ar pennad « *Gant mengleuz Imerys ez eo kontammet mirva naturel Groñvel* ». Fellout a ra d'ar skipailh *Splann !* lavaret en-dro n'eus ket fellet Imerys respont ouzh hor goulennoù.

Piv eo Splann !

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet. A-drugarez da zonezoù an dud e c'hall *Splann !* Goprañ kazetennerien da labourat war an hir-dermen hag embann enklaskoù war e lec'hienn internet hag e lizher-kelaouiñ.

Heulit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

GANT MENGLEUZ IMERYS EZ EO KONTAMMET MIRVA NATUREL

Ur c’hard eus andalouzit ar bed a vez produet ha puraet e Groñvel gant an embregerezh etrevroadel Imerys. Ha p’emañ ar Stad o paouez reiñ aotre d’an embregerezh da genderc’hel da vengleuziañ betek 2044, ha da doullañ ur poull eztennañ nevez, setu m’eo dezrevellet disoc’hoù dielfennadurioù bet goulnet gant *Splann* !. Kontammet eo endro brasañ mengleuz digor er Frañs gant metaloù pistrius a bep seurt.



Aurélie Calmet

- » Gant hon dielfennadurioù ez eus bet diskoachet ez eo tolpet ar metaloù pounner e gwele ar stêrioù en ardrañ da vengleuz Groñvel a oa etre 20 ha 60 gwech washoc’h eget ar feur uhelañ aotreet.
- » Kontammet eo bet betek mirva naturel rannvroel Magor Penwern.
- » N’eo ket bet kelaouet tud ar vro e vefe eus arsenik ha kadmiom, danvezioù kankreiat, mutagenek ha pistrius evit ar gouennañ.

Ur gwir kastell-dour e Kreiz-Breizh eo kumun Groñvel, gant he zachenn a 80 km². Hec'h eienennou, he gwazhioù-dour hag he geunioù a vag diazadoù doureier stêrioù an Ele hag ar Blavezh. Eno e kaver ivez annezioù naturel arouezius ar vro, lanneier, geunioù ha pradeier gleb. Evit gwareziñ ar pinvidigezhioù-se e oa bet savet Mirva natur rannvroel lanneier ha geunioù Groñvel¹, met ivez div lec'hienn Natura 2000 ha meur a Dakad Natur a Laz Ekologel evit al Loened hag ar Plant (TNLTEL). Pennbouzellet e vezer pa soñjer ez eo ivez e Groñvel brasañ mengleuz digor en he charre er Frañs : betek 1,5 milion a donennoù mein a vez tennet² ha puret gant an embregerezh etrevroadel, pezh a ya d'ober ur c'hard eus an andalouzit a vez produet er bed.

Pell zo eo chomet hep bezañ gwelet gant kalz a dud an « Damrec », evel ma vez lâret amañ, diwar anv kozh Imerys. Piv a oar, evit bremañ, petra eo an andalouzit, ar maeneg-se a zalc'h ouzh an temperadurioù uhel-kenañ ? Kavet e vez e doare danvez ouzhpenn er betoñs pe er livaj, er bloc'hoù-keflusker pe en holl fornioù an industriezh, er vetalouriezh pe en nukleel. Met ma implijer alies-mat an andalouzit en

industriezhioù evit he ferzhioù dibober (a zalc'h ouzh an tommder), n'eo ket un danvez a implijer war-eeun.

Diouzh un tu all, chomet eo didrouz lec'hienn Groñvel dre ma n'eo nemet ur vengleuz evit ar velestradurezh³ : gellet a reer empentiñ un dachennig war vord un hent didud, un nebeud kirri-samm. War-bouez...

War-bouez emaoamp e gwirionez dirak ur vengleuz gant kraterioù divent, uzinoù, poullou-dilaviñ leun a drenkenn ha menezioù lastez oc'h aloubiñ an dremmvro, en ur lonkañ parkeier, atantoù hag hentoù. Peadra da lakaat nec'het un nebeud mat a dud er vro, pa welont niver ar re baket gant ar c'hrignbev, ha p'en em c'houlennont petra a chomo eus an takadoù gleb, eus an eienennou, eus an añchañ en amzer da zont, pa ne vo tra ebet priziusoc'h eget an dour.

Fellout a ra da Imerys mont betek penn ar vengleuz koulskoude. Warlerc'h un enklask publik o virviñ ha tabutoù entanet, setu m'emañ ar Stad o reiñ an aotre da genderc'hel gant ar mengleuziañ betek 2044 en ur doullañ ur pevare poull eztennañ⁴ : un toull ken bras ha 15 tachenn melldroad ha ken don ha pemp savadur parizian bern-war-vern.

1] « Réserve naturelle des Landes et marais de Glomel », lec'hienn internet ar mirvaou naturel, bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

2] « Avis délibéré de la Mission régionale d'autorité environnementale de Bretagne sur le projet d'extension de la carrière de Guerphalès à Glomel (22) », Kefridiezh rannvroel Aotrouniezh an endro, 19 a viz Gwengolo 2022

3] « En Bretagne, une mine d'Imerys accapare et pollue la ressource en eau », Celia Izoard, Reporterre, 19 a viz Gwengolo 2024

4] « Côtes-d'Armor : feu vert pour la 4e fosse d'extraction d'andalousite d'Imerys à Glomel », Stéphanie Bescond, Les Échos, 12 a viz Gouere 2024

**MIRVA NATUREL RANNVRO
KONTAMMET GANT METALOÙ
PISTRIOUS :
DIELFENNADURIOÙ SPLANN !**

War lec'hienn internet Imerys Groñvel e c'heller lenn : « *unan eus prioriezhioù al lec'hienn eo merañ an distaolioù dourioù [...] er stêrioù, en takadoù gleb, ar gweleadoù dour danzouar tro-war-dro* ». A-bouez-bras eo an dalc'h, p'en em gav mirva naturel rannvro Magor Penvern en ardraoñ d'ar vengleuz. Ha goude-se, ur 6 km bennak eus al lec'hienn industriel e kaver kentañ añchadur dur mat er stêr Ele hag a zegas dour da 6.000 annezad er c'humunioù war-dro.

Bep bloaz e vez Imerys o tisteurel war-dro 1,5 milion a vetradoù kub a zourioù lous er Gergroaz⁵, ur wazhig-dour a vez o kildroeniñ er strouezh. Tretet e vez an dourioù-se, ha redioù ar prefeti o deus kaset an embregerezh da bostañ nevez zo en un unvez a zo he fal digreskiñ lodenn ar manganez hag houarn en distaolioù. Pezh zo, zoken war-lerc'h bezañ tretet e chom en dour kementadoù uhel a zanvezioù kontam-mus : prefeti Aodoù-an-Arvor en deus roet aotre d'an embregerezh da zisteurel betek 9 kg a hidrokarbidennoù hag, e-touez traoù all, betek 11 kg kobalt ha

**« Ar c'hementadoù
nikel ha kobalt a
ya da 60 gwech
ha 20 gwech
uheloc'h eget an
dalvoudegezh
skouer. »**

nikel bemdez⁶, metaloù kankreiat, mutagenek ha pistrious evit ar gouennañ.

« *Efed ebet war an dour* », eme koulskoude Imerys, he deus arc'hantaouet ur studi he doa padet pemp bloaz diwar-benn stad ekologel lennad ar Grazuz, ma red ar Gergroaz enni. Ur studi bet paeet gant an embregerezh⁷ hag a ro da c'houzout emañ ar wazh-dour « *e stad vat* » evit pezh a sell parametroù zo, met pezh zo heverk eo ne seblant ket vefe bet klasket er wazh-dour ar metaloù pistriosañ a vez taolet gant ar vengleuz. Perak 'ta e vefent bet dedennet da glask ma oa eus houarn, aluminium pa

n'o deus ket klasket danvezioù kalz pistriousoc'h evel an arsenik, ar c'hadmiom, ar c'ho-balt pe an nikel a gaver a-hent all e lastez ar vengleuz ? Respont ebet hon eus bet digant Imerys. Neuze evit gou-

zout hiroc'h eo bet divizet gant skipailh *Splann !* lakaat gouelezennoù ar Grazuz da vezañ dielfennet.

E miz Gouere hag e miz Gwengolo eo aet tud skipailh *Splann !* da dennañ meur a standilhon gouelezennoù e gwele ar wazh-dour, da gentañ-penn en argrec'h da lec'h disteurel dour ar vengleuz, evit gellet kaout ur standilhon « test » ; goude-se omp bet lec'h ma vez distaolet dourioù lous Imerys, hag erfin 2 gm en

5] « Demande d'autorisation environnementale d'exploitation de carrière – projet d'étude de la Fosse 4 – Étude hydrologique et hydrogéologique », GeoPlusEnvironnement

6] Diferad-prefed aotre endro evit korvioñ mengleuz ar skilt andalouzit gant ar c'hevredad Imerys Glomel el lec'h anvet « Gwerfalès », e Groñvel, prefeti Aodoù-an-Arvor, 20 a viz Gouere 2024

7] « Évaluation de l'état écologique du ruisseau de Crazius à Glomel (22) », Biométra, miz Meurzh 2024

ANALYSE DES SÉDIMENTS DU KERGROAZ ET DU CRAZIUS DANS LA RÉSERVE NATURELLE RÉGIONALE DE MAGOAR PENVERN

Métal lourd et/ou toxique	Point de rejet mine de Glomel/Imerys	Réserve naturelle régionale	Point amont/témoin	Seuil de risque de toxicité *	Valeur guide consensuelle pour le bon état écologique des sédiments d'eau douce**
Concentration en mg/kg	Rû de Kergroaz (voie publique)	(2 km du point de rejet d'Imerys en aval)	48°11'54"N 3°23'26"W	Limite TEC (Seuil d'effet)	
Arsenic	32	11	6,4	9,79	7,90
Cadmium	1,4	0,6	<0,40	0,99	0,93
Cobalt	269		11		20
Chrome total	25	15	27	43,4	
Cuivre	48	8	6,7	31,6	14
Manganèse total	29600	12050	207	460	460
Nickel	663	137	14	22,7	11
Plomb	21	16	6,7	35,8	25
Zinc	403	179	48	121	146

* MacDonald, D. D., Ingersoll, C. G. & Berger, T. A. Development and evaluation of consensus-based sediment quality guidelines for freshwater ecosystems. *Arch. Environ. Contam. Toxicol.* 39, 20–31 (2000). Pour le manganèse, cf. Peiyue Li et al., 2013, DOI 10.1007/s10661-013-3461-3

** De Deckere, E.; De Cooman, W.; Lejogap, V.; Meire, P.; Schmitt, C.; Von Der Ohe, P.C. Development of sediment quality guidelines for freshwater ecosystems. *J. Soils Sediments* 2011, 11, 504–517. [CrossRef] <https://link.springer.com/article/10.1007/s11368-010-0328-3>. Pour le cobalt, Smith et Carson (1981) ont établi que les sédiments d'eau douce non pollués devraient présenter des concentrations en cobalt similaires aux sols, soit moins de 20 mg/kg.

ardrañ eus an hevelep gwazh-dour, er mirva naturel rannvroel. Dielfennet eo bet ar gouelezennoù gant un arnodva kretaet gant Cofrac.

Displeget eo bet disoc'hoù an dielfennadurioù-se⁸ gant skoazell Frédéric Gimbert, arbennigour war ar saotradurioù mengleuzioù hag enklasker en eko-pistrioniezh e CNRS Besançon.

Tra ma ne gaver roud ebet eus saotradur e gouelezennoù ar skouerenn test bet tapet en argrec'h d'ar wazh-dour, lec'h m'emañ Imerys o tisteurel dour e kaver ur c'hementad nikel a ya da 60 gwech uheloc'h eget an dalvoudegezh skouer evit un dour dous e stad ekologel dereat, ha kementadoù kobalt a ya betek 20 gwech uheloc'h eget an

dalvoudegezh-se. Diskoachet ez eus bet ivez metaloù pistrius n'eo ket sañset Imerys disteurel en dour⁹ : tro pe der gwech a arsenik an dalvoudegezh reizh a arsenik hag ur c'hementad uhel e kadmiom, an daou o vezañ kankreiat, mutagenek ha pistrius evit ar gouennañ. Frédéric Gimbert, arbennigour war ar saotradurioù mengleuzioù hag enklasker en eko-pistrioniezh e CNRS Besançon, a zispleg : « *Kementadoù uhel a zanvezioù pistrius a zegas un dañjer da vat hag ur riskl posupl evit an endro. Ret e vefe ivez klask an danvezioù pistrius-se en douar lec'h ma kouezh ar boultrenn diwar ar mengleuziañ, ha mat e vefe kas ur studi ledanoc'h evit priziañ a r riskloù an endro hag ar yec'hed publik.* »

8] « Contamination aux métaux toxiques en aval de la mine de Glomel (22) - Analyse des sédiments du Kergroaz et du Crazius dans la Réserve naturelle régionale de Magoar Penvern », Splann !, 2024

9] Diferad-prefed aotre endro evit korvoiñ mengleuz ar skilt andalouzit gant ar c'hevredad Imerys Glomel el lec'h anvet « Gwerfalès », e Groñvel, prefeti Aodoù-an-Arvor, 20 a viz Gouere 2024

Gant hon dielfennadurioù ez eo bet diskoachet ivez ez ar c'hontammadur en tu all da drowardroioù tost ar vengleuz. Daou gilometr en ardraoñ d'ar vengleuz, e kalon mirva naturel rannvroel Magor Penwern, e kaver kementadoù nikel ha kobalt 10 gwech uheloc'h eget an talvoudegezhioù skouer evit ur wazh-dour e stad eko-logel a-zoare.

AÑCHAÑ DOUR MAT DA EVAÑ EN ARDRAOÑ D'AR VENGLEUZ

E peseurt stad emañ an traoù 6 km en ardraoñ, er stêr Ele lec'h ma vez tennet dour a vo tretet evit bezañ dasparzhet er c'humunioù tro-dro gant Dour ar Mor-Bihan ? Evit gouzout hiroc'h eo aet izili skipailh *Splann !* betek Toull Treñk, lec'h m'emañ ar greizenn glanaat dour e-kreiz labourioù just a-walc'h. Un unvez tretiñ a vezer o sevel evit ur c'houst a 6 milion a euroioù arc'hant publik¹⁰.

« *Saotradur an dour gant ar vengleuz ? Aes eo ! N'eus tra ebet da lâret aze. N'eus kudenn ebet* », eme raktal Dominique Riguidel, rener Dour ar Mor-Bihan, deuet e-unan da lâret deomp pa 'n em welomp. Digoret ez eus bet añchadurioù dour danzouar nevez a c'hello « *liesaat an danvez, ha digreskiñ ar c'hementadoù a vez lamet digant an Ele* », e tispleg deomp. Da lâret eo, evit bezañ resis,

« Gant Imerys e vez implijet mirva naturel da greizenn glanaat dour »

bevenniñ revit ma zepantfe nebeutoc'h diouzh añchadurioù Pont Sant Erwan war an Ele, en ardraoñ d'ar vengleuz. Padal e lâr deomp rener Dour ar Mor-Bihan deomp krenn-ha-krak : netra da welet gant ar fed e vefe Imerys o tisteurel bep bloaz 1,5 milion a vetradoù kub a zourioù leuna sulfat, hidrokarbidennoù ha metaloù pounner en argrec'h eus an añchadur. « *Gant an unvez nevez e vo moaien tretiñ gwelloc'h pestisidoù ha louzoù* », emezañ evit kendrec'hiñ ac'hanomp.

Nec'het e chom un ijinour war ar gimiezh hag arbennikour war ar c'hontammiñ evit aozadurioù yec'hed publik : « *Poan 'meus krediñ ne vefe liamm ebet etre an holl labourioù-se hag astenn ar vengleuz. Pa weler pegement e koust re-neveziñ ur staliadur evel-se, n'eo ket seurt traoù a reer hep kaout un abeg resis. Ha n'eo ket kustum kaout seurt doare tretiñ*

10] « Aménagement de l'usine d'eau potable de Toulreincq et raccordement de deux forages », Eau du Morbihan, 6 a viz Genver 2023, pajenn internet bet gwelet e miz C'hwevrer 2025.

dour e penn an diazad doureier, lec'h ma n'eo ket sañset bezañ ken saotret an dour. »

Evit anavezout kalite an dour war an Ele, en ardraoñ d'ar vengleuz, ken aes all eo mont da c'houlenn digant ajañs rannvroel ar yec'hed (ARS), a vez oc'h evezhiañ an añchadurioù. Goulennet hon eus diganto kaout an dielfennadurioù dour bet tapet en ardraoñ da C'hroñvel.

« *N'eus tamm kontrol yec'hed war al lec'h pourveziñ dour e Pont Sant-Erwan nemetken* », setu pezh zo bet respontet deomp gant an ARS. Neuze ne vefe ket evezhiet an añchañ dour ar muiañ en arvar da saotradurioù ar vengleuz : ne vez kontrolet an dour gant an ajañs publik nemet ur wech m'eo bet mesket gant dour ar greizenn glanaat dour. Ur wech tanavaet en dourioù bet tapet e lec'h all ne c'heller ket diskoachañ ken

« N'eus tamm kontrol yec'hed war al lec'h pourveziñ dour e Pont Sant-Erwan nemetken. »

danvezioù pistrius ar vengleuz. Pezh a lak tud zo a vez o chom en trowardroioù da ziverrañ stad an traoù, ha dipitet int : « *Gant Imerys e vez implijet mirva naturel rannvroel da greizenn glanaat dour* » evit gellet tretiñ an dourioù distaolet leun a vetaloù pistrius. « *Met ma kendalc'h da greskiñ kementad an danvezioù kontam-mus da greskiñ ez eus ur riskl ne vo ket posupl ken implijout an dout añchañ evit ober dour mat da evañ* », a zispleg deomp an ijinour war ar gimiezh.

**GANT LASTEZ AR VENGLEUZ
EZ EO KONTAMMET
AN DOURIOÙ DANZOUAR**

« *Un devezh tomm en hañv, pa oan krennardez e plije din klask al lennoù-dour en trowardroioù gant ar fotoioù dre satelit. Evel-se em eus diskoachet ul lagon glas e Groñvel, ha goulennet 'moa digant ma mamm : "Perak n'omp ket aet da gouronkañ du-se gwech ebet ?".* » Ha setu penaos eo bet diskoachet mengleuz Groñvel gant Camille : gant ar spi mont da gouronkañ. En aner : al lenn-se, 24 devezh-arat enni, bet ur poull eztenañ, ne ra nemet dastum dourioù trenk ha fank diwar an tretiñ dour en uzinoù ar vengleuz.

Soñj he deus ivez ur C'hroñveladez all :

« *E-doug an emvod-se e 2022 em oa bet goulennet petra a oa er foz a veze graet "foz 2" outi. Respontet e oa bet din gant tud Imerys «Mika hag oksidenn*

houarn». » Netra da vezañ nec'het gantañ, neuze... Moaien e vefe bet da Gamille kouronkañ enni. Padal, en un daolenn kollet -tousez an 3.000 pajennad eus teul an enklask publik, setu ma lenner ez eus er fank-se kementadoù uhel a gadmiom, krom, kobalt, nikel ha plom : metaloù « pounner » evel ma vez graet outo, kankreiat, neuropistrius, ha pistrius evit ar gouennañ¹¹.

Danvezioù kimiek all a vez implijet er vengleuz a gaver ivez e fank ar foz-se.

11]« Demande d'autorisation environnementale pour l'ouverture de la Fosse 4 - tome 2 : mémoire technique », GeoPlusEnvironnement, miz C'hwevrer 2023

COMPOSITION MOYENNE EN ÉLÉMENTS TRACES MÉTALLIQUES DES RÉSIDUS DE TRAITEMENT DU MINÉRAI ET DES BOUES D'HYDROXYDES (IRMG 2010)

Paramètre	Unité	Résidus humides		Résidus secs		Boues d'hydroxydes	
		Sur sec	Sur brut	Sur sec	Sur brut	Sur sec	Sur brut
Humidité	%	0,2	-	0,1	-	71,7	-
Matière sèche		99,8	-	99,9	-	28,3	-
Arsenic (As)	mg/kg MS	22	22	22	22	14	4
Cadmium (Cd)		< 0,5	< 0,5	< 0,5	< 0,5	2,7	0,76
Chrome (Cr)		87	87	110	110	22	6
Cobalt (Co)		23	23	30	30	2 590	733
Cuivre (Cu)		62	62	43	43	280	79
Mercure (Hg)		< 0,02	< 0,02	< 0,02	< 0,02	< 0,02	< 0,01
Molybdène (Mo)		< 0,5	< 0,5	< 0,5	< 0,5	< 0,5	< 0,2
Nickel (Ni)		49	49	70	70	3 870	1 095
Plomb (Pb)		33	33	26	26	24	7

E-doug un emvod publik e oa bet gwarantet gant mouezh aotreet an embregerezh e oa « *ne veze ket implijet danvezioù kimiek da geñver an eztennañ mein* »¹². Teulioù an enklask publik a zispleg koulskoude e vez implijet 75 toen a zanvezioù pistrius evit an endro hag ar yec'hed bep bloaz gant mengleuz Groñvel¹³.

Metil-izobutil karbinol da skouer, a zo un dileizher dañjerus evit ar gweleadoù dour dindan douar, met ivez an akrilamid, a zo kankreiat, mutagenek ha pistrius evit ar gouennañ, ar sulfonat natrium hag an amyksantat,

daou zanvez pistrius evit ar vuhez en dourioù.

Un tregont bennak a dodennoù eus an danvezioù-se a vez bannet el « lenn kaer »¹⁴ bep bloaz. N'eus netra evit mirout ouzh ar fank trenk-se d'en em silañ en dourioù danzouar adalek deun ar foz. Ha memestra evit takadoù all al lec'hienn m'eo miret fank enno : ar « *poull n°1* » (2 vilion a m³) hag ar « *chaoser kozh* » (900.000 m³)¹⁵.

Ha krog eo an devezioù kontammiñ al lastez pistrius-se da vont war-zu an dourioù danzouar : setu pezh a ziskouez elfennoù zo bet diskleriet gant

12] « Le site de Glomel aujourd'hui - de l'extraction des schistes à la Kerphalite (Andalousite de Glomel) », Abo-GeoPlusenvironnement

13] « Identification des réactifs chimiques potentiellement présents dans les déchets de l'industrie extractive (France) », danevell dibenn, BRGM, miz Even 2009

14] « Plan de gestion des déchets d'extraction stériles humides, résidus sableux (SABES) et boues d'hydroxydes - carrière de Guerphalès, commune de Glomel, département des Côtes d'Armor (22) », Axe Group evit Imerys, miz Gwengolo 2018

15] « Plan de gestion des déchets d'extraction provenant de la fosse 3 et stockés sur les versos Ouest et de Kerroué - Carrière de Guerphalès Commune de Glomel Département des Côtes d'Armor (22) », Axe Group evit Imerys, miz Gwengolo 2018

Imerys da servijoù ar velestradurezh. Gant unan eus binviji an embregerezh ez eus bet muzuliet e oa aet war-gresk spontus feur an danvezioù pistrius etre 2012 ha 2021¹⁶.

E-barzh danvezioù lastez ar vengleuz e kaver da skouer e-leizh a nikel, pa ouzer e teu kleñvedoù kalon ha gwazhied, ha krign-bev ar skevent hag ar sinuzioù diwarnañ. Betek 40 gwech ar feur nikel uhelañ aotreet en dour mat da evañ¹⁷ e kaver koulskoude en dourioù danzouar. Ha c'hoazh ne vez ket muzuliet darn vras an danvezioù pistrius all (kobalt, kadmium, arsenik, ha danvezioù kimiek all...) p'eo posupl e vefent bet o tizhout ar gwelead dour koulskoude.

E miz Even 2024 e oa bet servijoù ar Stad o hiraat eus 20 vloaz an aotre mengleuziañ, pezh a gaso da greskiñ ar bern lastez eus 12 milion a m³ ouzhpenn, kement a zanvezioù a vo berniet war al lec'h pa n'int ket sañset mont war-zu an dourioù danzouar evit ar c'hantvedoù da zont. Padal n'eo ket deuet a-benn Imerys da virout outo da gontammiñ an dourioù danzouar betek-henn.

HA PIV A VO AZE EVIT TRETİÑ AN DOURIOÙ TRENK ER BLOAZ 2150 ?

Sañset e vo echu e 2044 an eztennañ andalouzit hag erru e vo poent « *adla-kaat e stad vat* », evel ma vez lâret. Met un dra zo gant ar mein a vez eztennet e Groñvel koulskoude : pirit a gaver ennañ, da lâret eo sulfur. Ha diwar-se, pa vez ar glav o kouezhañ war ar reier lakaet en noaz dre an eztennañ, pe war ar bernioù divent a lastez diwar ar vengleuz, aze e teu an dour da vout trenkenn sulfurek, ha kas a ra gantañ d'an ardraoñ danvezioù pistrius all a gaver er reier¹⁸. Se eo pezh a reer « dizourañ trenk ar mengleuzioù », unan eus an doareoù spontusañ da saotrañ a weler pa douller mengleuzioù¹⁹.

Evit poent e vez dastumet ha tretet gant Imerys an holl zourioù a ruilh war al lec'hienn, ha tennet o zrenkennegezh. Met piv a raio kement all a-benn ur c'hantved, evit mirout ouzh ul lanv drenk da gontammiñ gwelead an Ele ? Hervez teul an enklask foran ec'h embann Imerys « ne c'hello ket an dour glav trenkaat »²⁰ ur wech ma vo lakaet al lec'h e stad vat en-dro. Ha lakaet

16] « Demande d'autorisation environnementale d'exploitation de carrière – projet d'ouverture de la Fosse 4


étude hydrologique et hydrogéologique », GeoPlus Environnement

17] Diferad eus an 11 a viz Genver 2007 diwar-benn bevennoù ha davevennoù kalite an dourioù kriz hag an dourioù evit bevezerezh an dud meneget er melladoù R. 1321-2, R. 1321-3, R. 1321-7 et R. 1321-38 kod ar yec'hed, Légifrance, 1añ a viz Genver 2023

18] « Plan de gestion des déchets d'extraction stériles humides, résidus sableux (SABES) et boues d'hydroxydes - carrière de Guerphalès, commune de Glomel, département des Côtes d'Armor (22) », Axe Group evit Imerys, miz Gwengolo 2018

19] « L'après-mine, carte géologique du monde », Géochronique, magazine des géosciences, miz Kerzu 2009

20] « Demande d'autorisation environnementale d'exploitation de carrière - tome 3 étude d'impact », GeoPlus Environnement, miz C'hwevrer 2023



« didreuzus » e vo ar bernioù lastez pistrius gant ur gwiskad restachoù mengleuz²¹ moan-tre goloet gant un nebeud santimetradoù douar war-c'horre. E-pad an dek vloaz goude bezañ lakaet un termen d'ar produiñ e raio an embregerezh war-dro heuliañ al lec'hienn. Gouzout a reer ervat koulskoude n'eus termen ebet d'an dizourañ mengleuz trenk, evel m'eo degaset da soñj kevredigezh geologourien mengleuz SystExt²². E Chessy-les-Mines, e departamant ar Ron, ez eus bet tennet gounid eus ur

gwelead pirit abaoe ar Grennamzer. Serret e oa bet ar vengleuz goude ma vefe bet fontet an doullenn bennañ er bloaz 1877. Hervez un danevell chomet kuzh bet savet gant ar BRGM²³ (Burev an Enklaskoù Geologel ha Mengleuzioù) e 2019 bet lennet gant skipailh *Splann* ! ez eo diskrivet penaos e vez treset an dourioù trenk e Chessy. Merzhet ez eus bet gant ar Stad e oa « *re saotrus* » an dourioù, *daoust ma oant bet treset « abaoe 130 vloaz »*, a dre-se en deus bet ranket ar Stad lakaat

21] « Demande d'autorisation environnementale pour l'ouverture de la Fosse 4 - tome 2 : mémoire technique », GeoPlusEnvironnement, miz C'hwevrer 2023

22] « Chessy, une légende du cuivre face aux défis des pollutions minières », Systex, 8 a viz Meurzh 2022, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

23] « IHS de Chessy-les-Mines (69), rapport annuel de surveillance, année 2018 », BRGM, miz Gouere 2019

« Kudennoù bras divent zo bet degaset deomp gant saotradur mengleuzioù gwechall. »

sevel lec'hioù tretañ doureier e 2005. 150 vloaz en deus padet an dizourañ mengleuz trenk e Chessy hep na vefe bet digresket tamm trenkted an dour na feur uhel ar metaloù en dour abaoe keit all, hervez an danevell.

Ar gudenn zo ledet war 40 devezh arat e Chessy a vefe war 530 devezh arat e Groñvel. Krouiñ ur poull nevez ha bernioù lastez ouzhpenn ne raio nemet kreskiñ kementad an dourioù trenk a vo ret plediñ ganto evit ar 6 pe 7 rummad da zont. Dominique Williams, ezel eus Dour ha Stêrioù Breizh a zispleg : « *Kudennoù bras divent zo bet degaset deomp gant saotradur mengleuzioù gwechall, ha n'eo ket dianav d'ar Stad pa rank merañ anezho well-wazh. Met ober a ra an Hevelep fazioù, ha betek 10 gwech gwashoc'h zoken. Gant servijoù ar prefeti eo bet roet an aotre hep muzuliañ pegen bras ar saotradur.* »

Kelaouet e oa bet prefeti Aodoù-an-Arvor

ha renerez rannvroel an endro diwar-benn ar saotradur gnt metaloù pounner bet diskoachet gant hon enklask, ha diwar-benn ar c'hudennoù bet savet gant an dizourañ treñk a-vras a vefe pa vo serret al lec'hienn. Gant Rannro Breizh ivez « *ez eus bet kaset an titouroù-se d'ar Stad evit*

ma c'hellfe respont ouzh an nec'hamant bet diskouezet gant an dud » e-keit ma lavare da *Splann !* e oa « *war evezh war ar galv bet embannet* » diwar-benn ar saotradur er mirva naturel rannvroel. Ha koulskoude, daoust m'hon doa savet goulennoù, n'eus ket fellet d'ar Stad respont ouzomp. An embregerezh Imerys, diouzh he zu n'eus ket fellet respont ouzh hor goulennoù, padal hon oa roet digarez dezho da zont en-dro war ar fed m'o doa diskleriet ne oa ket eus metaloù pounner nag efedoù war an dour. Met evit bremañ ez eo bet kaset dirak al lez-varn an tabut diwar-benn astenn ar vengleuz. E dibenn miz Here ez eus bet lakaet dirak lez-varn velestradurel Roazhon gant ar gevredigezh Dour ha Sterioù Breizh ur rikour en enep da zigeriñ ur foz nevez.

Celia Izoard

Kaoz eus poultrenn gant Imerys

« *Ha gwelet 'peus ar poultrenn aze ? Evet e vez gant al loened hag analet gant hor bugale* », eme ur C'hroñveladez, gwreg ul labourer-douar, nec'het anezhi. Mantret eo Emilie¹ o tiskouez deomp ar san-dour war doenn he zi. Goloet eo gant ur gwiskad du ur meudad a devder outañ. « *Naetaet eo bet ganin, met deuet eo en-dro dindan un nebeud mizioù hepken* », emezi c'hoazh.

En tu all d'an teir labouradeg a gaver war al lec'hienn, pezh a zegas ar boultrenn-se zo ar « Sabès » un duchenn vras a lastez en tu all da dregont metrad a uhelder, war un dachenn ken bras hag 50 tachenn melldroad. Pa c'hwezh an avel e sav ur blumachenn a strew poultrenn war ar vro.

Gant kement a glemmoù bet douget he deus ranket ar Stad goulenn digant Imerys lakaat er c'hêrioù tro-war-dro jaojoù « Owen », seurt endalc'herioù plastek sichtet war ur peul. Hervez an embregerezh « *eo bet diskouezet n'ez a ket en tu all d'ar reolennadurioù ar feurioù bet muzuliet nepell eus al lec'hienn* »². Pezh ne fell ket dezho lâret ez eo n'eo ket trawalc'h muzuliañ kementadoù poultrenn, o zañjerusted eo. War ar poent-se eo bet lâret gant Imerys d'an annezidi e oa « *aluminium dre vras e poultrenn ar vengleuz* ».

En un danevell bet embannet gant an embregerezh e c'heller lenn ivez ez eo « *traezh moan prop a vez berniet war ar Sabès, n'eus danvez kimiek ebet enno* ». En tu bennak e-mesk 3.000 pajennad an enklask foran³ e kaver roll gwirion an danvezioù a gaver er boultrenn a ya d'ober lastez ar vengleuz : an hevelep aridennad metaloù kankreiat a gaver ivez er goueledennoù bet dielfennet gant *Splann !* : krom, arsenik, nikel, plom...

Evit lod eus an annezidi ez eo lastez ar vengleuz, hag ar boultrenn dreist-holl, gant kleñved-red ar c'hrign-bev bet diskoachet e trowardroioù al lec'hienn. Soñj en deus Jean-Yves Jego, desaver loened en ur gêriadenn nepell ha kuzulier-kêr an tu-enep e Groñvel eus pezh a oa bet lâret dezhañ gant implijad an MSA p'en doa loc'het gant an desevel givri er bloaz 2011 : « *Hanter dre farse-rezh en doa goulennet diganin : Ha sur oc'h e fell deoc'h en em staliañ amañ ? Tri faotr yaouank zo bet falc'het gant ar c'hrign-bev nepell amañ !* »

Celia Izoard

1] Pa vez tud gant un anv bihan hepken e talv eo bet cheñchet an anv

2] « Le site de Glomel aujourd'hui - de l'extraction des schistes à la Kerphalite (Andalousite de Glomel) », Abo-GeoPlusenvironnement

3] « Demande d'autorisation environnementale pour l'ouverture de la Fosse 4 - tome 2 : mémoire technique », GeoPlusEnvironnement, miz C'hwevrer 2023

Un dachenn c'hleb

n'eo ket ur blantenn en ur ranndi

Ar poull n°3 a vezer o toullañ evit poent a oa bet toullet war un dachenn c'hleb¹ ha war un takad gwarezet gwazhioù dour. Hag evit gelllet labourat eno e oa bet Imerys o vangounellat dibaouez an dour danzouar, ha dizouret alese ul lodenn gaer eus an tachennoù gleb tro-war-dro. « *Evel-se e oa bet distrujet da vat an eiennoù war ribl dehou ar wazh pemp bloaz zo, pa oa bet brasaet ar poull* », hervez Christelle, labourerez-douar hag ezel Refrac'terres, ur gevredigezh a vod tud ar c'hornad koulz hag arbennigourien, gant ar pal enebañ ouzh digor ur pevare poull.

Touet eo bet gant Imerys koulskoude « *ne vo distrujet tamm tachenn c'hleb ebet* » gant ar poull niverenn 4. Ezhomm e vo bangounellat dibaouez an dourioù danzouar koulskoude, pezh a c'hellfe disec'hiñ an tachennoù gleb tro-dro. Evit miret ma vefent distrujet eo bet kinniget gant an embregerezh d'ar velestradurezh ur wikefre eus ar re speredekañ : ur « *savell dourañ sprinklerioù warni* » evit dourañ e-doug darn ar bloaz tachenn c'hleb Kerroue tost alese². Goulennet hon eus digant Bernard Clément, kelenner war ekologiezh ar plant e Roazhon hag arbennigour al lanneier hag ar geunioù pezh a soñje eus an dibab-se : « *Digaset eo dour an tachennoù gleb diwar ar mammennoù dour peuz-don : bouetaet gant ar c'hondon, ha n'eo ket gant an dour a-ziwar gorre.* » Un dachenn c'hleb n'eo ket ur blantenn ti. Gant prefeti Aodoù-an-Arvor eo bet asantet e vefe eus an dourañ geunioù, met anvet eo bet « *sikour d'ar morizeloù* », kuit na vefe graet goap.

Celia Izoard

1] « Demande d'autorisation environnementale pour l'ouverture de la Fosse 4 - tome 2 : mémoire technique », GeoPlusEnvironnement, miz C'hwevrer 2023

2] « Demande d'autorisation environnementale d'exploitation de carrière - tome 3 étude d'impact », GeoPlus Environnement, miz C'hwevrer 2023

Gwir da respont Imerys

An embregerezh Imerys he deus kaset ur respont da *Splann !* goude e oa bet embannet an enklask-se. Gallout a rit lenn an destenn war hol lec'hienn web : www.splann.org

EMAÑ IMERYS O TERRIÑ AN DEMOKRATELEZH LEC'HEL

E Groñvel, e Kreiz-Breizh Aodoù-an-Arvor, eo ledet tamm-ha-tamm levezon ar gompagnunezh etrevroadel Imerys, en ur glask reiñ outi hec'h-unan ur skeudenn pozitivel, kement ha lakaat an dud da asantiñ ouzh he mengleuz andalouzit hag hec'h astenn. Met krog eo an daolenn da deñvalaat diwar taolioù kreñv enebiezh ha reuz kreñv hag ingal.



Aurélie Calmet

- 】 Gouzout piv a skoazell Imerys a gas reuz e-touesk an dud, rannet evel m'emaint etre ar re a zifenn an implijoù hag ar re a zo a-enep an nozadurioù degaset gant ar vengleuz.
- 】 Sikouret eo ar c'hevredigezhioù lec'hel gant an embregerezh — dreist-holl ar gevredigezh a ra war-dro ar mirdi natur rannvroel Groñvel — ha lavarout a ra e roont arc'hant bras da vudjedoù ar strollegezhioù lec'hel.
- 】 Perc'henn eo Imerys war 10 % eus gorread labour-douar talvoudus ar gumun, ha feurmiñ a ra pe lakaat a ra un hanter eus e zouaroù e-kerz al labourerien-douar. Ur mod da waskañ war an dud.

Tri soudard gant o dilhad da goach, harp ouzh mogerioù sal gouelioù Groñvel, an devezh Sul-se a viz Gwengolo 2022¹. O jilettenoù harz-tennoù tro-dro dezho, o armoù war o lez hag o mindrailherez en o dorn, kemer a reont perzh en unvez evezhiañ hag emellout an archeriezh (PSIG), un unvez karget da stourm ouzh ar gwalldaolioù war an hent foran.

Ral a wech e tispaker kement all en ur gumun a 1.400 den eus Aodoù-an-Arvor. Peadra a oa aze evit spontañ an ugent bennak a geodedourien prest da loc'hañ gant un droiad war droad war-zu uhelderioù Groñvel evit priziañ dalc'h ur vengleuz andalouzit war an dremmvro. An embregerezh etrevroadel Imerys eo a labour war ul lec'hienn ken ledan ha 520 devezh arat hag aotreet da denañ 1.5 milion a donennoù reier bep bloaz².

Un nebeut devezhioù a-raok e oa bet embannet gant Imerys Groñvel e felle dezho astenn al labourioù, da lâret eo toullañ ur poull ouzhpenn.

Daou vloaz war-lerc'h, d'an 21 a viz Here 2024. Pa zihun tud Groñvel e welont gerioù livet e lizherennoù ruz bras war dalbenn greunvaen an ti-kêr³ : « Imerys skarzh alese », « Goubrenerezh », ha zoken « IMAIRYS » evit lakaat war-wel

pegen tost oa an ti-kêr gant an embregerezh. En devezhioù a-raok e oa bet unan bennak o klask dre ziv wech plan-tañ tan en treuzfurmer tredan⁴ gouestlet d'ar vengleuz. Ha setu sachet eo sel-loù an holl war ar vengleuz, padal e vez peurluviañ o klask chom en didrouz.

Rak gwir eo, dibosupl eo gouzout ez eus ur vengleuz digor bras-divent pa vezer o vont dre hentoù don Kreiz-Breizh. Stank eo ar girzhier, ha kuzhet eo ar poulloù mengleuziañ en tu all d'an tuchennoù koadek.

Dre ur pont e c'heller mont dreist al lec'hienn koulskoude, met staliet ez eus bet outañ panelloù da guzhat an dremmvro, ha netra n'heller gwelet eus pezh a zo a bep tu, evel pa vefemp en ur bon soudarded.

UN TI-KÊR DINDAN LEVEZON

Direbech e oa bet hent an embregerezh betek-hen koulskoude, pa glaske gwarrantañ hec'h astenn hag an toullañ ur poull nevez, en ur glask kaout an ti-kêr etre he daouarn da gentañ penn.

Ma vefe tost an ti-kêr ouzh an embregerezh e c'heller klevet didro nozvezh an dilennadegoù ti-kêr, war ziaraok sal ar gouelioù, e miz Gwengolo 2023.

Gant ur Groñvelad e oa bet klevet re-nerez mengleuz Imerys, Christelle

1] « Annonce événement : randonnée « Au pied de la mine », d'an 9 a viz Gwengolo 2022 aozet gant Réfrac'terres », lec'hienn web ti-kêr Groñvel, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

2] « Avis délibéré de la mission régionale d'autorité environnementale de Bretagne sur le projet d'extension de la carrière de Guerphalès à Glomel (22) », kefridiezh rannvroel aotrouniezh evit an endro, Gwengolo 2022

3] Skeudennoù embannet war gont Facebook kumun Groñvel, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

4] « La mairie de Glomel taguée d'inscriptions en lien avec le projet d'extension de la mine », Aurélie Lagain, Ici, 22 a viz Here 2024, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

Planque, o tridal ouzh ar pellgomz : « *Mat eo ! An ti-kêr o deus bet !* » O kaozeal diwar-benn Bernard Trubuilt hag e gen-listennerien a oa aet ar maout ganto e-tal da Jean-Yves Jego, diazezer ar gevredigezh Douar Bev, a oa bet savet evit enebañ ouzh digoradur ur poull nevez war lec'hienn ar mengleuziañ andalouzit, hag e penn ur sinadeg he doa tapet 6.620 anv warni⁵.

O kontañ ar mouezhioù e dilennadegoù abred evit ti-kêr Groñvel emamp. Mouezhiañ dic'hor-toz p'eo en em gavet da greiz ar respetad ha diwar c'houlenn ar prefed. Ar maer bet dilennet e 2020, Thierry Troël, zo labourer-douar bio ha bet kuzulier rannvro sokialour. Kement ha stourmoù hag a zilezioù zo bet er c'huzul-kêr tri bloaz goude⁶ m'en deus kollet ar muiañ-niver, ha m'eo bet ar prefed o reiñ urzh, dre un diferad⁷, derc'hel dilennadegoù abred e miz Gwengolo 2023.

Petra 'noa plantet tan ha kaset an distruj e kalon ar c'huzul-kêr ? « *An teuliad diwar-benn poull nevez Imerys* », a zispleg deomp Thierry Troël. Er c'hontrol

diouzh ar vaered diagent o doa bet diskouezet⁸ o skoazell ingal ouzh pep goulenn digant Imerys, Thierry Troël e doa kredet goulenn ma oa reizh derc'hel gant ar mengleuziañ andalouzit. Ha ne oa ket boaz an embregerezh ouzh seurt goulennou, ha kroget start da zistagañ « *marc'hata en-enep din ha meur a hini o reiñ e zilez diouzh ar c'huzul-kêr* ».

Laouen-bras e oa neuze renerez ar vengleuz gant disoc'hoù an dilennadegoù nevez-se. Trec'h ur maer a-du gant ar vengleuz a roe frankiz da Imerys war an dachenn⁹.

Ha n'eo ket souezh neuze ma vefe bet unan eus mouezhiañ kentañ ar c'huzul-kêr nevez o reiñ un aotre astenn d'ar vengleuz¹⁰. Pa oa bet savet outañ ar goulenn en doa ranket anzav ar maer nevez n'en doa ket lennet an enklask foran (3.000 pajennad). « *Pedet eo bet an dilennidi nevez da wladenniñ ar vengleuz hag un displegadenn vat zo bet roet deomp e-kerzh ar wladenn* », evel ma tispleg deomp. Mab ur micherour er vengleuz eo, hag ar wech kentañ dezhañ lakaat e dreid eno d'e 69 vloaz.

« Mat eo ! An ti-kêr o deus bet ! »

5] « Non à l'extension de la Mine de Glomel en plein cœur de la Bretagne ! », Bascule Argoat, Douar Bev, Refrac'terres, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

6] « Démissions à Glomel : de nouvelles élections en septembre, le maire Thierry Troël pas candidat », *Ouest-France*, 28 a viz Even 2023

7] « Arrêté portant convocation des électeurs de la commune de Glomel – élections municipales et communautaires partielles intégrales des 17 et 24 septembre 2023 », isprefeti Gwengamp, 24 a viz Gouere 2023

8] « Imerys. Motion de soutien pour l'autorisation », *Le Télégramme*, 14 a viz C'hwevrer 2016

9] « Glomel. Les réponses des candidats aux élections municipales », *Ouest-France*, 15 a viz Gwengolo 2023

10] « Extrait du registre des délibérations du conseil municipal de la commune de Glomel », Kuzul-kêr Groñvel, 21 a viz Du 2023



Aurélie Calmet

IMERYS, UN EMBREGEREZH A ZEGAS IMPLIJOÙ

Evit ma vefe degemeret gwelloc'h gant tud ar vro ez eus bet kaset gant Imerys ur c'houlzad kehentiñ efedus. Lavaret e reomp e vez implijet 120 den eno¹¹, pa ne vez nemet 91 micherour e mengleuz Groñvel, o labourat en eurioù disteudet e doare an tri-eizh. Skoazellet int gant un ugent bennak a labourerien etretant. Ha forzh penaos ne vo implij ebet ouzhpenn evit ar poull nevez, en embregerezh e-tro mekanikoù emgefreak e pep lec'h.

Pa savomp ar goulenn outo ec'h embann ar vicherourien ez int stag da vat ouzh o labour. « *Hor micher eo, ha plijout a ra deomp bevañ diouti, entanet omp ha pa vezomp nec'het a-wechoù zoken. Nec'het eo pep implijad. M'eo nac'het ar goulenn astenn e chomo al labour a-sav e 2037* », emeont e miz Mae 2023 da geñver ur pennad-kaoz war RKB¹², radio ar c'horn-bro.

Er c'horn-bro e santer ivez evez un doare anaoudegezh vat ouzh Imerys an implijerez. Evit lod ez eus bet tennet un tad a familh vras diouzh an alkool ha diouzh an dilabour, evit lod

11] « Compte-rendu de la réunion du 30 mai 2024 de la commission départementale de la nature, des paysages et des sites « formations carrières », Renerezh an darempredoù gant ar strollegezhioù tiriadel, 30 a viz Mae 2024

12] « Carrière Imerys Glomel : la parole au comité de soutien de Guerphalès », La petite lanterne, RKB, 10 a viz Mae 2023

all ez eus bet roet ul labour d'ar mab, d'ar verc'h, en un takad lec'h ma ne anavezet nemet labourat ouzh ar chadenn.

Forzh penaos, astenn ur vengleuz, dre m'eo ur staliadur lakaet e renk evit gwarez an endro (ICPE), a rank doujañ diouzh ur goulenn aotre endro digant servijoù ar Stad, hag ouzh un enklask foran.

En diskar-amzer 2003 e oa bet dalc'het an enklask foran-se. 428 ali¹³ a oa bet degemeret, 269 a-du en o zouez. E-touez an alioù a-du, 109 digant implijidi ar vengleuz hag o familh, implijidi Groñvel met ivez implijidi Imerys Frañs, ganto kargoù uhel, en o zouez rener obererezhioù Imerys, Philippe d'Agier. A-du ivez nav geologour a labour evit ti Imerys pe evit burevioù studi hag evit 23 embregerezh eilkevraerien. En holl d'an holl, 40 % eus an alioù a-du a zeu digant tud e-liamm war-eeun gant an embregerezh.

UR SIKOUR D'AN EMBREGEREZHIOÙ LEC'HEL

En e gehenterezh emañ Imerys Groñvel o komz eus 25 kevredigezh « kevelerien »¹⁴. Un emglev a dalvez ur skoazell arc'hant evit budjed ar c'hevredigezhioù ha kleboù lec'hel. Dre fentigell e vez graet eus se « *ar yalc'had da 400 €*

d'an nebeutañ evit ar c'hevredigezhioù a c'houlenn ! ».

Pep lec'h e weler Imerys : war rochedoù nevez bugale kleub melldroad Rostrenn, war ar banniel dispaket gant ar c'hleub da geñver ar c'hrogadoù, war skritelloù ar c'homiteoù gouelioù¹⁵.

War ur bajenn Facebook¹⁶ evit skoazell an astenn, deuet war-wel e miz Genver 2023 dindan an anv kaer « Komite skoazell mengleuz Gerfalez », diwar anv ar gêr ma kaver ar vengleuz enni, ez eus bet embannet gant Imerys luc'hskeudennoù gweladennoù ar vengleuz.

Aze e weler e oa bet deuet Skol-eur an Amzer vak, an Esat, ar Rotary kleub, met dreist-holl bugale skolioù prevez ha publik an trowardroioù, bet tapet o foltred e-barzh bailhoù mekanikoù bras-divent.

ARC'HANT AR VENGLEUZ E BUDJED AR C'HUMUNIEZHIOÙ

Fougeet eo an embregerezh etrevroadel gant ar perzh a gemer e budjedoù ar c'humuniezhioù lec'hel da geñver he skodenn war gwerzh ouzhpennet an embregerezhioù (SGOE pe CVAE), un taos paeet gant an embregerezhioù a ra ur sifr aferioù en tu all da 500.000 € hag a vo nullet e 2027.

Ar sifr-se, 120.000 € SGOE ar bloaz, a oa bet embannet war ur skramm bras¹⁷

13] « Synthèse des observations émises durant l'enquête publique concernant la demande d'autorisation environnementale présentée par la société Imerys à Glomel »

14] « Imerys Glomel », lec'hienn internet Imerys, pajenn web bet gwelet e viz C'hwevrer 2025

15] Skritell « Les inter bourgs, dimanche 27 août 2023 », komite ha kevredigezhioù gouelioù kumunioù Groñvel, Plourae, Tregorn hag an Drinded

16] « Comité de soutien à la carrière de Guerphalès », Facebook, bet gwelet e viz C'hwevrer 2025

17] Foto eus ar c'hinnig « Impact socio-économique et chiffres clés du site de Glomel », miz C'hwevrer 2023

«Breinet eo ar c'hevredigezhioù a ra war-dro an endro gant ar muzulioù digoll ! »

e miz C'hwevrer 2023 gant Imerys, evit an arvesterien deuet niverus d'ober anaoudegezh gant raktres nevez digoradur ur pevare poull. War ar skeudenn e resisaont ouzhpenn e ra 20 % eus ar skodennoù a vez tapet gant Kumuniezh kumunioù Kreiz-Breizh (KKKB pe CCKB) e 2022. Met n'eo gouest nag ar maer, na prezidantez ar strollegezh da resisaat petra eo lodenn an taosoù roet gant Imerys Groñvel d'o budjed. Hollek eo ar yalc'had ha n'eo ket resisaet.

Penn-renerezh an arc'hant publik (DGFIP) a zastum an taos-se, bet goulennet gant *Splann !*, en deus respontet deomp ne oa ket foran seurt titouroù. Un tamm souezhet e oa neuze Sandra Le Nouvel, prezidantez

ar C'humuniezhioù kumunioù. « N'eo ket reizh ar sifroù-se. Resevet hon eus 650.000 € e 2022 diwar paeamant ar SGOE. N'eus nemet 53 % eus ar SGOE hag a ya d'ar gumuniezh kumunioù. » Da lâret eo 63.600 € diwar ar 120.000 € roet gant Imerys. Pezh a ra nebeutoc'h eget 10 % eus ar SGOE tapet gant KKKB.

Ouzhpenn da-se, hervez danevell Arsella an arc'hant hag ar merañ foran lec'hel¹⁸, « un drederenn eus an tailhoù dastumet gant ar strollegezhioù a vez paeet gant an embregerezhioù, dont a ra ar peurrest diouzh an tiegezhioù hag ar velestradurezhioù publik. »

IMERYS HAG AR MIRVA NATUREL DORN-HA-DORN

Skoulmet eo darempredoù start etre an embregerezh etrevroadel hag un oberour all a gas levezon evit kehentiñ glas ar strollad : ar Gevredigezh evit diorren lec'hioù naturel Groñvel (KDLG pe AMV) a vez o verañ mirva naturel rannvroel lanneier ha geunioù Groñvel.

Prizius-kenañ eo gallet menegiñ ur gevredigezh a ra war-dro an endro da reiñ he gwarant war doujañs an endro e-kriez ar vengleuz. Ha kavout a reer logo ar gevredigezh-se war holl deulioù kehentiñ Imerys Glomel¹⁹.

En tu all da skoazelloù Imerys da vudjed kevredigezh an endro, a ya da 10.000 €,

18] « La contribution fiscale des entreprises aux services publics locaux », Observatoire des finances et de la Gestion publique Locales, miz Meurzh 2023

19] « Quel avenir pour le site de Glomel ? », Imerys, Etat d'esprit, 10 a viz C'hwevrer 2023

da lâret eo pemp gwech yalc'had ar gumun²⁰. Skoulmet eo neuze ur c'hevele-rezh etre ar vengleuz hag an AMV, evit div a gefridi : evezhiañ ar falc'huned hag ar marc'hvrini a vez o neizhiañ war dalbenn benañ kozh ar vengleuz, ha kontañ niver ar stlejuiled hag ar raned. Karget eo bet ivez da gas en-dro muzulioù digoll ar vengleuz.

Ha gwir eo, seul daol ma vrasañ ar vengleuz e vez distrujet an takadoù gleb, ar girzhier. Rediet eo neuze da zigoll an distrujoù-se en ur adkempenn an endro. Pezh a zo erbedet el lodenn « diarbenn, digreskiñ ha digoll »²¹ e-liamm gant pep raktres meur. Roet ez eus bet arc'hant d'an AMV gant Imerys evit kas al labourioù da benn war takadoù kizidik ar gumun²², hag alese ez eo an AMV barner ha barnet war an dro. Ur doare « *marc'had a c'hounez diouzh an daou du* », hervez e brezidant Yvon Le Méhauté.

« *Breinet eo ar c'hevredigezhioù a war-dro an endro gant ar muzulioù digoll !* » Setu bepred pezh a lâr deomp ur vaouez o chom er vro, hag he deus bet labouret e bed an endro, ha displegañ a ra ne dalvez ar muzulioù digoll nemet evit reiñ talvoud d'ar gwir da zistrujañ an natur, n'eo un digoll netra ouzhpenn

un digoll, ne c'holo gwech ebet ar gwir dle ekologel bet lezet gant an diskar.

RASTELLAÑ AN DOUAROÙ ?

Pep lec'h en em sil Imerys : adalek ar c'hevredigezhioù war an endro, ha betek skridoù ar sonioù savet gant Jean-Daniel Bourdonnay, gwenaner ar gumun a zo ivez skrivagner, sonaozour ha kaner. E mi Here paseet en do roet ur sonadeg ha kanañ a rae e Brezhoneg gant e vouezh dous ur son bet savet gantañ, *Moustrougant*, diwar anv ul lec'h tost ouzh ar vengleuz. « *Dindan reier ha traezhenn eo bet douaret ma vilajenn.* »

Kalz a fontoù zo bet prenet gant Imerys e Groñvel. Ha pa veze tiez, karrdioù, kreier war an douaroù prenet e vezent distrujet pe laosket da gouezhañ

en o foul, evel e Roc'h Ledan, Kersioc'h pe Kertrimont.


Ha ma ranker diroudennañ hentoù, distruj kêriadenoù, diheñchan milieroù a m³ dour un diazad doureier warzu unan all, diblasañ linenoù tredan, linenoù pellgomz, funioù dour, treiñ parkeier meur a zevezh arat enno da venezioù lastez ken uhel ha brasañ tuchenoù an trowardroioù, da Imerys n'eus netra dibosupl.

Ar muzulioù digoll ne dalvez nemet evit reiñ talvoud d'ar gwir da zistrujañ an natur.

20] Danevell dalc'h kuzul-kêr Groñvel, 5 a viz Ebrel 2024

21] « Éviter, réduire, compenser » (ERC) : en quoi consiste cette démarche ? », République française, miz Eost 2020, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

22] « Bilan technique simplifié des travaux effectués dans le cadre des mesures compensatoires zones humides par l'entreprise Imerys refractory minerals Glomel, suivi pour la maîtrise d'ouvrage par l'association AMV. », danevell, Imerys, AMV, 2016



Aurélie Calmet

Rak ganto mañ hiriv an deiz 1.130 devezh arat a zouaroù, da lâret eo ouzhpenn 10 % eus an douaroù labour-douar er gumun, ha derc'hel a ra da brenañ douaroù ouzhpenn, ha pa vefent douaroù hetamm andalousit er c'hondon.

E miz Here 2023²³ e oa bet Imerys o teurel he youl war 28 devezh arat ouzhpenn, en ur ginnig d'ar gwerzher ur priz kalz uheloc'h eget hini ar marc'had²⁴. Met tud ar vro oc'h en em sevel hag ar sindikad Kengevread ar

Beizanted o doa gelllet lakaat un termen d'ar marc'had-se.

Tost d'un hanter eus douaroù, da lâret eo 500 devezh-arat, n'int ket liammet war-eeun gant ar vengleuz. Lakaet int e kerzh pe feurmet int gant al labourerien-douar²⁵ peadra da gaout harpdigant ar re a vez o labourat an douaroù-se, just a-walc'h. Ur skoazell ouzhpenn a c'heller merzhout en enklask foran, rak bet eo labourerien-douar an takadoù tro-dro zo bet o reiñ o asant evit ma vefe brasadet ar vengleuz.

23] « Rassemblement contre l'achat du Mini'Du par Imerys le 14 octobre à 14h », lec'hienn internet rares averse, 10 a viz Here 2023, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

24] « Contribution de la Confédération Paysanne des Côtes-d'Armor à l'enquête publique relative au projet d'ouverture d'une nouvelle fosse d'extraction d'Andalousite par la société Imerys Glomel », Kevredad peizanted Aodoù an Arvor, 14 a viz Kerzu 2023

25] Stagadenn 6 an enklask publik, 18 a viz Gwengolo 2023

« TEKNIK AR GAMIZOLENN SPARLAÑ »

« *Emaomp o stourm evit ma vefe diskoachet ha displeget ar c'hudennoù gwirion ; met seul vui e stourmomp, seul vui e parlont ac'hanomp* », eme Armelle Renaut en ur venegiñ Imerys. He gwaz, Thierry Troël, labourer-douar bet maer ar gumun, a zo o paouez koll 28 devezh-arat a veze feurmet dezhañ gant Imerys abaoe 25 bloaz. « *Ne gredomp ket kehentiñ war-se, dre m'en em c'houlennomp ma n'emaomp ket o vont da vezañ tapet da skouer, evit lakaat ar re all da devel.* » Met ouzhpennañ a ra n'en em lezo ket da ober, ha lakaat a raio da dalvezout e wir da feurmiñ, dre al lezvarn ma rank ober.

Abaoe un nebeut sizhunvezhioù emañ Imerys Groñvel o varc'hata en-dro gant pep labourer-douar rekis an termenou feurm bresk a veze re-

nevezet a vloaz da vloaz, evit lakaat anezho digoust.

Hag un taol skoazell d'al labouerien-douar e vefe ? N'eo ket, rak gwarezet mat-tre e vez al labourerien-douar gant ar c'hevratou-feurm, ha n'hell bezañ torret nemet dre fazi ar feurmour, pa varv pe pa ya ar feurmour war e leve, pe c'hoazh ma cheñch an takadoù feurmet (kemm termen an takad, distruj an dachenn...).

Ha kas ar c'hontradoù-feurm-se da get a rofe tro da Imerys da implijout

an douaroù evel ma kar, hep na vefe posupl enebañ war dachenn al lezenn.

SAOTRADUR A VENGLEUZ EO IVEZ RANNAÑ AN ANNEZIDI

« *Sell, hi 'ni eo...* » Setu pezh a vez klevet gant ur vaouez a zo ezelez eus ar gevredigezh Refrac'Terres pa ya d'ober he c'hefridi en ispisiri ar gumun. Troet eo da fall an aergelc'h ha torret an emglev a veze etre Groñveliz.

Dre deir gwech ez eo kastizet an annezidi dostañ d'ar vengleuz. Ouzhpenn da gaout nozadurioù a ya war-gresk ar bloavezhioù diwezhañ, met o zo a goll o zalvoudegezh, o stourm a lak anezho a-gostez.

Start eo evito degermer raktres Imerys, ha seul vui ma ez implijet gant Imerys hag an implijidi ha gourdrouz an dilabour evit en em wareziñ.

Lâret eo sklaer gant Olivier Berger, bez-prezidant e karg eus an oberezhioù industriel e Imerys Frañs ouzh mikro RKB²⁶ : « *Astenn a reomp al labourioù er vengleuz evit reiñ labour d'an dud hag evit mont war-raok gant al lec'hienn.* »

Pezh a vez kontet gant he renerien a ro da soñjal tagañ ar vengleuz a dalvez tagañ an implijidi en em gav war al linenn gentañ. Ha nac'hañ an astenn a dalvez kemer ar riskl da welet ar vengleuz serriñ abred.

Gwelloc'h eo neuze da dud zo er vro

26] « La carrière Imerys de Glomel, une nouvelle fosse en prévision. », La Petite Lanterne, RKB, 14 a viz Du, 2022

chom mud ha mirout ar peoc'h etre an dud. Kaer e vez paeet gant ar re a vez o vanifestiñ. Renerez skol publik Groñvel he doa nac'het ar bedadenn kaset gant Imerys da lakaat he skolidi da weladenniñ ar vengleuz, rak eviti n'he deus ket un embregerezh da implijout bugale ar skol evit kas war-raok ur c'hehentiñ pozitivel, p'he deus poan reiñ outañ e-unan ur skeudenn gaer. Met da heul eo bet tennet yalc'had prometet gant Imerys da genseurtiezh laik Groñvel. Hag abalamour da-se e vefe aet kuit bugale an dilennidi eus ar skol publik d'ar skol brevez ? N'eo ket souezh kennebeut ma vefe bet nac'het gant ar c'huzul-kêr nevez ar yalc'had a 200 €²⁷ d'an div gevredigezh

war an endro enep raktres ar pevare poull, Douar Bev ha Refrac'terres, rak « *en arvar e lakaont Imerys* ».

Echu gant al lubanerez e penn-kentañ an hañv. Roet an aotre²⁸ d'an 20 a viz Even 2024 gant ar prefed evit astenn mengleuz Imerys. Un diviz ofisiel a lak un termen d'an divizoù ha da jestroù-c'hoari kaer an embregerezh. Eizhtez war-lerc'h ez eo bet bodet komite heuliañ al lec'hienn²⁹ gant ar gal-loudoù publik ha renerien ar vengleuz. Serret dor an emvod gant renerez al lec'hienn, en ur leuskel ar-maez annezidi ar c'hornad hag izili ar gevredigezh Refrac'terres.

Morgan Large

27] Danevell dalc'h kuzul-kêr Groñvel, 5 a viz Ebrel 2024

28] Diferad-prefed aotre endro evit korvoiñ mengleuz ar skilt andalouzit gant Imerys Glomel el lec'h anvet « Gwerfalès », e Groñvel, prefeti Aodoù-an-Arvor, 20 a viz Even 2024

29] « À Glomel, les riverains refusés au comité de suivi d'Imerys mais invités à des tables rondes », Pauline Launay, *Ouest-France*, 17 a viz Even 2024

Boest du

Morgan Large, an hini he deus skrivet ar pennad-mañ, a zo bet kuzulierez e ti-kêr Groñvel e-tre 2017 ha 2020.

AN EMBREGEREZH IMERYS EMAÑ O C'HOUNIT UN TOULLAD ARC'HANT

En tu all d'ar skeudenn a embregerezh familh ez eo Imerys Groñvel unan eus ad-embregerezhioù un impalaeriezh finañsel gwall ledan. En e benn e kaver rumm ar re Frère hag ar re Desmarais. Pell eo neuze ar pennoù-bras diouzh ar reuz sokial, pa c'hell ar renerien gounit milionoù a euroioù a-drugarez d'ar min e Aodoù-an-Arvor.



Aurélie Calmet

- 】 Aksionerien bennañ istor Imerys oa Albert Frère ha Paul Desmarais. Tizhout o doa ur binvidigezh a 5 miliard ha 4,5 miliard a euroioù da bep hini anezho da zevezh o marv.
- 】 O heritourien zo e-barzh an holding GBL (Groupe Bruxelles Lambert e galleg), ur galloud finañserezh perc'henn war ouzhpenn an hanter eus kevala Imerys.
- 】 Enebiezh tud Groñvel a c'hell mont en-enep strategiezh diorren Imerys he deus loc'het ur raktres mengleuziañ lithiom e departamant an Allier.

Ha pa glasker gouzout e Groñvel piv zo e penn an embregerezh a ren ar vengleuz andalouzit, n'heller ket gouzout da vat. Evit annezidi zo – ar re goshañ – ez eo ar vengleuz d'an Damrec (Denain Anzin Maenadoù Dibober ha prierezh), an embregerezh istorel deuet eus Hanternoz Frañs, ha staliet e Groñvel er bloaz 1970. « *Un teñzor bihan eo a zo deuet deomp, ha laouen-bras e oamp, abalamour ma veze paeet deomp an taos micherel* », eme René Quilliou, a oa bet maer e Groñvel etre 1980 ha 1995.

Evit tud all ez eo perc'hennet an embregerezh gant ur gompagnunezh etrevroadel anvet Imerys, 13.700 implijad ganti e 54 bro disheñvel¹, ha ken pell e seblant he rennerien ma ne oar den o anvioù.

Met evit darn vras Groñveliz ez eo meret al lec'h gant un embregerezh familh eus Frañs hag emañ e renerezh, Christelle Planque, war al lec'h. Evel milieroù a gêrioù all emañ Groñvel o vevañ e koulz ar finañs etrevroadel e gwirionez : lec'hel ha bedel war an dro, gwelus ha diwelus, fetis ha difetis. Met piv eo Imerys 'ta ?

Evit gouzout e ranker mont en-dro red an istor². Ganet e oa bet an Damrec e kavell kapitalourez industriel an

Norzh-Pas-de-Calais. Adalek 1969 e c'hall an embregerezh ober testoù ha klask war an douaroù. Un aotre evit digeriñ ar min he deus bet d'an 23 a viz Eost 1972 dre un diferad ministrerezh. Pa oa loc'het e veze ur c'hant bennak a implijidi ganto ha rakjedet e oa bet e vefe bet etre 60.000 ha 70.000 tonenn maen-kailh.

E 1985 e oa bet adprenet an Damrec gant an embregerezh Imetal bet savet gant ar familh Rothschild o doa graet ur fortun vat er bankerezh. Erru Imetal en e varr e teu da vezañ danvez ur pred da lonkañ evit Albert Frère ha Paul Desmarais, un daouad arc'hantourien veur eus Belgia ha Kanada. Evito n'eus an embregerezhioù nemet danvez

Emañ Groñvel o vevañ e koulz ar finañs etrevroadel e gwirionez.

arc'hant da c'hounit a rank degas talvoudegezh ouzhpenn, un doare evel un all da liesaat postadurioù arc'hant.

Evel-se o deus o-daou kemeret lodenoù en Imetal e 1987 dre ur framm arc'hantel m'emaint kevranerien outo, anvet Pargesa, a zo perc'henn eus ar Strollad Bruxelles Lambert (GBL). Ledet eo e obererezhioù dre an Azia³, en Amerika ar Su hag er Stadoù-Unanet. E 1999 e paouez gant e gemmoù ha tapout a ra da anv an hini zo ganti hiriv an deiz : Imerys.

1] « Universal registration document including the annual financial report », Imerys, 26 a viz Meurzh 2024

2] « Demande d'extension de carrière pour l'exploitation d'andalousite de Guerphalès », kumun Groñvel, Damrec, miz Even 2010

3] « Albert Frère réduit légèrement sa participation dans Imerys », zone bourse, 8 a viz Even 2010, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025



Dimezet e oa bet Ségolène Frère hag Ian Galienne e 2003 e Kastell Marc'h Wenn e Sant-Emilion.

Tro ar bloavezhioù 2000 eo bet an daouad miliarderien o c'hoari an diaoul hag e bevar, en ur ober o mad eus finañsierizañ ar rann industriel. Ha gant o c'hen-framm arc'hantaouiñ anvet Pargesa o deus bet kemeret lodennoù en holl⁴ embregerezhioù etrevroadel a-bouez, evel Lafarge, Total pe GDF Suez.

Gant levr *Les Prédateurs* (Denis Robert ha Catherine Le Gall, 2018, ti-embann *Cherche Midi*) e vez diskouezet mat penaos e vez kaset ivez obererezhioù gwall, evel e 2006 da skouer, pa oa bet gwerzhet ar chadenn *Quick* da *Gef* ar *Fiziadennoù* hag an *Tredeogañ Frañs*.

UN DAOUAD MILIARDERIE O C'HOARI AN DIAOUL HAG E BEVAR

Pell e oa eus kêrig *Groñvel* an daou zense o c'hoari an diaoul hag e bevar. Evel-se e oa *Paul Desmarais* oc'h aozañ ur gouel divent evit lidañ 80 bloaz e wreg *Jacqueline* en o demeurañs e *Sagard*, e *Bro-Gebeg*. En ur video bet savet gant an *Anonymous*⁵ ha lakaet war *YouTube* e weler ar gouvidi justennoù ha jakedennoù, en o zouez *George W. Bush* hag e wreg, *Donald Trump* hag ar c'hanner *Robert Charlebois* zoken, an holl anezho tost-ha-tost dindan *koupolennoù* doare *Venezian*.

4] Danevell vloaziek, *Pargesa holding SA*, 2014

5] « *DVD Gouverne(mental)* », *Anonymous Quebec*, youtube, 30 a viz Mae 2012, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

Gwelet a reer pauned plouzennet war an taolioù lec'h ma oa ar champagn o tere dek hardizh, ha pep hini goude ar serr-noz da dostaat ouzh ur sal abadennoù bet savet evit an degouezh e liorz an annez. Ur bloavezh labourioù a vefe bet gouestlet d'al labourioù, hag o defe koustet tro-dro da 12-14 milion a zollaroù Kanadian a frejoù boued ha kinkladurioù, da lâras kazetennerien ar gelaouenn c'hoap a vro-Gebek anvet *Le Couac*, bet meneget gant ar gelaouenn *Le Devoir*⁶.

Daou vloaz war-lerc'h, e miz Gwengolo 2003, ez eo tro e geneil Albert Frère da sevel ul lid war an ton bras. E kastell ar Marc'h Gwenn, e Saint-Émilion, un annez bet prenet hanter-hanter etre Bernard Arnault hag Albert Frère e 1998. En demeurañs kaer-se, savet gant mein gwenn en ur winieg eus ar c'hentañ e oa bet dimezet e verc'h Ségolène d'ur paotr yaouank kran hag imor enañ, Ian Galiennie. War ar fotoioù⁷ e weler tud vrudet e-leizh tro-dro d'an dud nevez, evel da skouer Bernadette Chirac, Betty Lagardère pe c'hoazh Nadine a Rothschild.

Ugent vloaz war-lerc'h ez aet da Anaon Albert Frère hag e gomper Paul Desmarais. Pinvidigezh Paul Desmarais⁸ a oa erru da 4,5 miliard a

euroioù da zevezh e varv e 2013, hini Albert Frère⁹ da 5 miliard a euroioù p'en doa kuitaet an douar e 2018. Legadet o doa d'o bugale o lodennoù en embregerezh Pargesa, hini e-penn an holding GBL gant 31 % a aksionoù.

GBL a zo perc'henn eus 55 % Imerys (da lâret eo 68 % gwir da votiñ), asambles gant Blue Crest Holding (5 %) hag ur bern aksionerien all (40 %).

Ne oa ket entanet mab henañ Albert Frère gant bed an aferioù, neuze ez eo e vab-kaer Ian Galiennie en deus ambrouget adalek e bazennoù kentañ. Merañ a ra evel-se ar font kapital riskloù Ergon e 2005 (font an embregerezhioù GBL ha n'int ket feuriet en eskemmi), a-raok dont da vezañ merour dileuriad GBL seizh vloaz goude¹⁰. Evel-se eo deuet ar paotr nevez da vezañ rener an embregerezh postañ galloudus-se. E-tal an heritourien, daou gevrannege all, ganto 5 % ha 6 % GBL : an embregerezh postañ arc'hant diazezet en Delaware (Stadoù-Unanet), Artisan Partners Limited Partnership hag Artisan Partners Asset Management Inc hag hini New York, First Eagle Investment Management LLC.

HÈRED WAR ROUDOÙ O ZUD

Dre meur a embregerezh, heritourien Frère ha Desmarais a zo e penn GBL,

6] « Anonymous publie une vidéo filmée à Sagard », Jean-François Nadeau, *Le Devoir*, 30 a viz Mae 2012

7] « Nadine de Rothschild et Betty Lagardère - Mariage de Ségolène Frère et Ian Galiennie à Saint-Émilion », *PurePeople*, 6 a viz Gwengolo 2003, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

8] « Paul Desmarais, l'influent homme d'affaires canadien s'est éteint », Laurance N'Kaoua, *Les Échos*, 10 a viz Here 2013

9] « Albert Frère, l'homme d'affaires le plus riche de Belgique est mort », F. Bergé gant an AFP, *BFM Business*, 3 a viz Kerzu 2018, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

10] « Difficile succession à la tête de Groupe Bruxelles Lambert », *Le Monde*, 3 a viz C'hwevrer 2015

perc'henn war ouzhpenn an hanter eus kevala Imerys. Ian Galienne eo ar merour dileuriad outañ hag e Chief Executive Officer (CEO), rannañ a ra ar renezh gant Paul Desmarais Junior, mab Paul Desmarais, Prezidant ar C'huzul Merañ.

Merourien all a gaver en o c'hichen¹¹, Cédric Frère, mab-bihan Albert Frère; Paul Desmarais III, mab-bihan Paul Desmarais, ha Ségolène Frère Galienne. E penn ur strobad embregerezhioù lies-seurt emañ bremañ an hêred : ganto 55 % eus Imerys, met ivez 8 % eus Adidas pe 7 % eus Pernod Ricard.

Heritourien Albert Frère ha Paul Desmarais a rann bremañ gant o zud dreist-vrudet plijadurioù ober aferioù ha chom en didrouz. War a seblant emañ Ségolène Frère o tispenn roudoù he zad, p'emañ o liesaat he c'hefridi hag he fostadurioù. Sezañ a ra e Kuzul Merañ Power Corporation, holding ar familh Desmarais met ivez en hini Christian Dior SE hag hini Kevredad Keodedel Kastell ar Marc'h Gwenn. E miz Eost 2023 e oa bet kaoz ma tapfe ul lodenn e embregerezh kosmetek La Rosée dre an embregerezh postadurioù FG Bros bet savet ganti ha gant he gwaz Ian Galienne, hervez kelaouenn *L'Echo*¹².

« Paul Desmarais Junior emañ evel e dad, techet da vont dreist muzul. »


Evit pezh a sell ouzh Paul Desmarais Junior, emañ evel e dad, techet da vont dreist muzul. Gwrac'h eo gant al lec'hioù naturel ha gouez, tro-dro da lenn Memphremagog, en hanternoz da vMontreal, er C'hanada, hervez *Kazetenn Montreal*¹³. War unan eus an tachennoù-se en doa bet c'hoant lakaat sevel ur c'henkiz bras-divent gant un dachenn tennis¹⁴ en diabarzh, hag evit-se en doa bet goulennet un dirojañs evit ma vefe roet gwir dezhañ da zigoadañ 2.500 m². Nac'het gant an ti-kêr. N'eo ket evit kement-se e vo kemmet priz an ti a oa bet lakaet tro 28 milion a zollaroù Kanadian (18.511.080 €).

11] Danevell vloaziek 2023, GBL

12] « Le couple Frère-Gallienne goûte à la crème des cosmétiques », Simon Souris, *L'Écho*, 9 a viz Eost 2023, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

13] « Desmarais Jr voulait protéger des moutons invisibles », Caroline Lepage, *Le Journal de Montréal*, 24 a viz C'hwevrer 2017

14] « Une petite ville de l'Estrie dit non à Paul Desmarais Junior », Martin Jolicoeur, *Le Journal de Montréal*, 27 a viz Genver 2024



Aurélie Calmet

Evel-se e kendalc'h da greskiñ pinvidigezh hêred Albert Frère ha Paul Desmarais aet war roudoù an daouad brudet. Start-mat eo reiñ sifr resis omadoù, met e danevell GBL e c'heller lenn roll o goprou degaset dre o fostoù niverus. Ian Galienne, dre m'eo merour dileuriad, en deus bet ur gopr bloaziek ingal a 1.200.000 €, ouzhpenn ur paeamant war gemm eus 600.000 €. Diouzh e du, dre m'eo prezidant ar C'huzul Merañ, Paul Desmarais Junior en doa bet 192.500 €, e-keit ma oa bet gounezet 42.500 € e 2023 gant Ségolène Frère ha Cédric Frère dre ma oant merrourien. Paeamantoù ouzhpenn ar re o doa bet dre m'emaint merourez e-barzh embregerezhioù all evit Ségolène Frère, pe Prezidant Kuzul Power Corporation evit Paul Desmarais junior.

UN HEULIAD HOLDINGOÙ

Gant an tiegezh Frère-Desmarais emañ e bed ar gevraneien hag e hini an embregerezhioù etrevroadel. Pell-mat eus endro Groñvel lec'h ma stourmer diwar-benn digoradur da zont pevare poull mengleuz andalouzit gant Imerys. Liammet eo an daou ved koulskoude, dre ur steudad diwelus a embregerezhioù finañs berniet an eil war eben evel merc'hodennoù Rusian. Mezevennet e vezer pa lenner an danevelloù finañs. Gwir eo e plij kalz da Albert Frère ha Paul Desmarais ha da galz eus o c'henseurted, sevel frammoù luziet.

Perc'hennet eo Imerys Groñvel gant daou holding finañs anvet Mircal¹⁵ ha Parimetal, bet savet e 1985 evit unan, egile e 1978. Dalc'het eo

15] « Bilan de l'exercice clos », teul kontouriezh, Mircal, 31 a viz Kerzu 2023

penn-da-benn an daou embregerezh gant ar strollad Imerys France Groupe hag a zo d'e dro dalc'het evit 55 % gant an holding GBL neuze. Met n'o ket a-walc'h c'hoari toull-kuzh, e-kreiz ur rouedad gwall luziet. Dalc'het eo evit 31 % gant Pargesa, a zo perc'hennet evit 100 % gant an holding Partjoinco, a zo etre daouarn an daouad Frère ha Desmarais. Bremañ m'emaint marvet e kaver lodennoù outo e skourr pep tiegezh. En tiegezh Frère, da skouer, e kaver 50 % dalc'het gant an holding Eagle capital SA, perc'hennet d'he zro gant daou hêr Albert Frère, Ségolène ha Gérald. Ha memestra diouzh tu tiegezh Paul Desmarais.

E diabarzh framm finañs ha kevran-nel GBL, n'eo Imerys Groñvel netra ouzhpenn un embregerezh e-touez un toullad re all. Ul lodennig eo eus Imerys Frañs a zo d'he zro ul lodennig eus GBL.

Met ur strollad en e varr eo Imerys evit poent, p'emañ « *er penn a-raok er bed a-bezh evit pezh a sell embregerezhioù arbennikaet er maenadoù evit an industriezh* ». E 2023 e oa an embregerezh en doa lakaet GBL da enkefiañ ar brasañ gounidoù diwar rannadoù gant 179 milion a euroioù, da lâret eo 38 % eus hollad ar gounidoù tapet er bloaz 2023 (gounidoù dreistordinal e-liamm gant dilez skourr obererezhioù HTS-diskoulmoù temperadurioù uhel).

E-keit-se e oa gounidoù Imerys Groñvel o tizhout 2,5 milion a euroioù e 2021¹⁶ ha 2,3 milion a euroioù e 2022¹⁷.

Dasparzhet eo bet gant Imerys Groñvel 99,8 % e doare rannadoù e 2021 ha 41,7 % e 2022. Pa weler pegen luziet eo ar rouedad a holdingoù bet diskri-vet a-us, ez eo diaes-mat kompren da betra a dalvez an arc'hant-se. Savet hon eus goulennoù da zaou zen barrek war ar sujed : hervezo e c'hall bezañ bet implijet evit plantañ arc'hant e obererezhioù all pe reiñ d'an aksioner-ien. Met hep dokumantoù resis eus pep embregerezh eo dibosupl gouzout pelec'h e ya an arc'hant. N'eus ket bet c'hoant GBL respont d'hon c'houlennoù war-se.

TABUT E GROÑVEL : UN AMPROUENN EVIT RAKTRESOÙ ALL IMERYS AR MENGLEUZIAÑ ER FRAÑS

En un tu eus ar chadenn, kevranneien GBL ha renerien Imerys. Diouzh an tu all, ul luskad o nagenniñ e Groñvel ha ne baouez ket da greskiñ. Ha gour-drouzet e c'hellfe bezañ an embregerzh etrevroadel ?

Ne vez ket diskaret gant ar renerien industriezh ar riskloù a zeu diwar enebiezh tud ar vro ouzh ar raktresoù mengleuziañ. Doktoez e douaroniezh e skol-veur Lyon 2 eo Pauline Massé, hag eviti ez eo liammet ar stourmoù o

16] « Rapport du commissaire aux comptes sur les comptes annuels, exercice clos le 31 décembre 2021 », teul kontouriezh, Imery refractory minerals Glomel

17] « Comptes sociaux de l'exercice clos le 31 décembre 2022 », teul kontouriezh, Imerys Glomel

kreñvaat war an tiriadoù ouzh ul luskad « mengleuziañ nevez » er Frañs¹⁸. E de-roù ar bloavezhioù 2000 e oa bet loc'het gant ur strategiezh a oa he fal reiñ un emrenerezh energiezh d'ar vro. Alese kresk an niver a c'houlennoù aotreoù mengleuziañ ha da heul un niver brasoc'h-brasañ a stourmoù ha tabutoù.

E 2023 eo bet EY (Ernst and Young bet), unan eus brasañ kabined kuzulerien er bed, o doa lakaet ar stourmoù-se evel an hini kentañ eus ar riskloù meur¹⁹ evit ar strolladoù mengleuzierien meur : « *Kudennoù an endro hag ar gevredigezh a chom er renk kentañ ar bloaz-mañ. Deuet eo ar c'hriterioù-se da vezañ un elfenn bouezus e raktresoù arc'hantaouiñ ha strategiezhoù an embregerezhioù mengleuziañ.* » Evit Christian Mion, a labour evel arbennigour ar mengleuzioù hag ar marc'hadoù da zont e ti Ernst and Young, ret e vo d'an embregerezhioù gwellaat evit kemer e kont ar seurt riskloù. « *Un dra nevez a-walc'h eo seurt emzalc'hioù er Frañs, ha ret eo d'an embregerezhioù mont war-raok war hent an deskiñ. Ha ma ne zoujont ket ouzh ar c'hriterioù e c'hell ar fazioù kaout ur c'houst bras.* »

Gant renerien Imerys eo bet komprenet mat petra a oa an dalc'h, ha pouezañ a reont war skeudenn « c'hlas » ar strollad. Patrick Kron, prezidant

kuzul merañ ha penn-rener ar strollad Imerys, a veneg « *engouestlañ divrall* » an embregerezh a fell dezhañ « *bezañ er penn a-raok evit pezh a sell ouzh prientiñ un dazont gwelloc'h* » en e zanevell enrolañ hollek e 2023²⁰.

A-hed ar pajennoù e veneger en danevell an troioù-lavar a gas ar gaoz war an treuzkemm ekologel : « *savadurioù padus* », « *simant glas* », « *savadurioù izel o c'harbon* », « *fiñvusted padus* » ha « *panelloù fotovoltaek* ». E-keit-se e Groñvel emañ Imerys o lakaat war-wel ar muzulioù digoll bet lakaet ganto evit gwareziñ an endro, an adkoadañ a-youl vat, pe c'hoazh ar c'hreñvaat girzhier. Un doare kehentiñ a ya kontrol ouzh ar wirionez deuet diwar hon dielfennadurioù : saotret meurbet ez endro ar vengleuz. Ha trawalc'h e vo ur c'houlzad kehentiñ evit stourm ouzh avel ar reuz o c'hwezhañ e Groñvel hiriv an deiz ? Daoust ma n'hellont ket toullañ kaoz war-eeun gant kevranneien GBL a chom ken pell outo, nec'hus-bras e chom enebourien Imerys, evel ur c'hreunenn traezh a vir ouzh strategiezh astenn ar gompagnunezh. Ur strategiezh e plus-tr er mare-mañ dres, en Echassières en Allier, lec'h m'emañ ar strollad ur raktres mengleuziañ litium.

Catherine Le Gall

18] « Des instruments (insuffisants) pour gouverner les critiques adressées au « nouveau minier » en France métropolitaine. Une articulation autour des référentiels de l'environnement et du territoire », Pauline Massé, revue Gouvernance, 13 a viz Here 2021

19] « Top 10 business risks and opportunities for mining and metals in 2024 », danevell, EY, 2023

20] « Universal registration document including the annual financial report », Imerys, 26 a viz Meurzh 2024

KEITH BARRON : UN INDIANA JONES O KLASK AOUR E BREIZH

E 2023 e oa bet ar start-up Breizh Ressources o fiziañ didrouz-kaer tri goulenn aotre mengleuziañ war 42 gumun etre Breizh ha Maine-ha-Liger. En-ofisiel emañ an embregerezh diazezet en Oriant gant ar spi kavout aour hag un daou-ugent maenad all. En tu all d’an embregerezh e kaver ur geologour klasker aour, hag un embregerezh Kanadian a vez o vestroniañ ar jeu.



Julia Giordano

- 】 Gant ar start-up Breizh Ressources ez eus bet fiziet tri aotre enklask mengleuziañ war un dachenn a c’holo en tu all da 850 km² war 42 kumun.
- 】 Daoust m’emañ diazezet en Oriant, Breizh Ressources zo renet gant ar Breizh-veuriad-Kanadian Keith Barron, un den brudet evit bezañ bet diskoachet brasañ mengleuz aour ar bed.
- 】 Keith Barron zo ivez e penn an embregerezh Auriana Resources diazezet e Toronto ha marilhet en Inizi Bermudez, kevranneg nemetañ Breizh Ressources.

UHag ur pennad nevez Indiana Jones a vefe o tont war ar sterne Breizh? Abaoe un toulad mizioù ez eo en em gavet e Kornôg Frañs un den tres un aventurer gantañ, hag a glask un teñzor kollet. Keith Barron, geologour Breizh-Veurriad ha Kanadian o chom e Bro-Suis¹, paotr tri-ugent vloaz, griz e varv ha lugernus e zaoulagad pa gomz eus aour. Emañ e penn ar start-up Breizh Ressources, diazezet en Oriant, ispisializet en enklaskoù mengleuziañ, hag en deus fiziet tri goulenn aotre enklask mengleuziañ (PERM)² etre miz Gouere ha miz Here 2023.

E bal : kas da benn ar c'hlaskerezh war un dachenn en tu all da 850 km² war 42 kumun, lec'hiet etre Breizh istorel³ hag ar Maine-ha-Liger⁴. Un doare-ober ha n'eo bet roet d'an dud da c'houzout nemet e penn-kentañ 2024, ha n'eo ket bet hep sachañ evezh tud ar vro koulz hag ar mediaoù.

Pa lenner roll micherioù Keith Barron e ranker anzav ez eo un den hep e bar. Evit poent n'eo ket gwall anavezet en Europa, padal ez eo brudet e metoù mengleuzierien Amerika. Kinniget evel un esparadenn zoken evit kazetennoù tud e vicher : gantañ eo bet diskoachet

unan eus brasañ mengleuzioù aour ar bed, e 2006, ar Fruta Del Norte, e Gevred an Ecuador⁵.

An istor evel m'eo kontet gant ar geologour a dalvezfe e vefe savet ur film diouti. Krog e oa an traoù e 1998, en Ecuador. Hervez Keith Barron ez eo ar bloavezh-se e oa aet d'en em staliañ e Quito, kêrbenn ar vro du-se, evit gwellaat e anaoudegezh eus ar spagnoleg, goude m'en defe bet tapet e ziplom geologouriezh e Skol-veur Western Ontario, ha goude bezañ bet labouret e Gwiana hag er Venezuela.

Eno e oa lojet en ur familh lec'h ma oa kelenner war an istor an tad, hag un arbennigour war kartennoù kentañ korn Amazonia ar vro. Dedennet gant ar maenadoù eveltañ en doa sachet e evezh dezhañ war ziv lec'hienn, bet toullet gant ar Gonkistadored Spagnol gwechall-gozh, ha goloet gant gwez ar janglenn abaoe: Sevilla del Oro ha Logrono de los Caballeros (er Su da gêr Quito).

DISKOACHET GANT KEITH BARRON UNAN EUS MENGLEUZIOÙ AOUR BRASAÑ AR BED

Krog e oa ar paotr yaouank da glask ar c'hêrioù aet diwar-wel abaoe pell,

1] « statuts constitutifs de Breizh Ressources, société par action simplifiée », 11 a viz Gwengolo 2023

2] « Demande de permis exclusif de recherches de mines (PERM) Taranis », bet kaset da vinistr an Ekonomiezh, 11 a viz Here 2023

3] « Demande de permis exclusif de recherche de mines (PERM) Epona » bet kaset da vinistr an Ekonomiezh, 21 a viz Gouere 2023

4] « Demande de permis exclusif de recherches de mines (PERM) Bélénos » bet kaset da vinistr an Ekonomiezh, 5 a viz Here 2023

5] « Keith Barron back on the hunt for riches of Ecuador's Lost Cities », Trish Saywell, The Northern Miner, 24 a viz Meurzh 2017



war-lerc'h bezañ bet o studiañ e-pad daou viz an teulioù e-barzh levraouegoù ar Stadoù-Unanet ha re Ottawa er C'hanada. Ur wech erru war an dachenn e oa bet ur gavadenn dic'hortoz war e hent : diskoachet gantañ hag e zaou geneil boulc'hoù aourek e-barzh « *Cordilla del Condor* », nepell eus an div gêr.


E-pad ar pemp bloaz da heul eo en em lakaet an tri den da ergerzhout dre ar munud an dachenn en tu all da 180 devezh-arat. A-benn ar fin, e miz Meurzh 2006 en em gavont gant un teñzor war o fri : lec'hienn Fruta Del Norte, gant 10 milion a oñsoù aour (pa ouzer e ra un oñs 31,10 gram). Daou vloaz war-lerc'h e voe gwerzhet ganto ar vengleuz d'an embregerezh etrevroadel Kinross evit 1,2 viliard a zollaroù Kanadian. Gant ar gelaouenn ispisializet *The Northern Miner*^{6]} e voe graet neuze « *mengleuzerien ar bloaz* » eus Keith Barron hag e zaou gomper. Evel e oa deuet tre anv Keith Barron er vojenn. Setu evit pezh a reer kontadenniñ, pe

« *storytelling* ». Met evit William Sacher, kelenner Kanadian hag enklasker e Quito, en Ecuador, entitlet gant un doktorelezh e geo-skiantoù, dav eo chom war evezh memestra : « *Un istor kaer eo a gomz eus kartennoù kozh, eus kaout fri, eus chañs hag eus primvezad, un istor da vezañ lakaet etre divskouarn ar gevranneien, met hervezon emamp pell-mat eus ar wirionez.* »

Evit William Sacher ez eus da gentañ ur mont en-dro pragmatek gant ar geologourien ispisializet er c'hask maenadoù : « *Labourat a reont gant sikour teknikoù resis, evel studiadenoù skiantel bet graet er c'hondon gant aozadurioù ispisializet (evel Burev an enklaskoù geologel ha mengleuziañ pe BRGM), er Frañs, ha diazezañ a reont war guzulierien skiantet war al live lec'hel.* »

Barregezhioù all a vefe ganto ivez, met n'int ket gwall vrav da anzav : « *Gouest int da gavout an dud gouest da zegas titouroù mat dezho, ha barrek int evit marc'hata gant ar pal tizhout al lec'hioù o*

6] « Aurelian Trio Our Mining Persons Of The Year », *The Northern Miner*, 29 a viz Kerzu 2008



Julia Giordano

deus ezhomm. E broioù zo e c'hellont mont betek goubrenañ fonksionerien », a soñj dezhañ.

KOMZOÙ KAER, PEADRA DA BLIJOUT D'AR GEVRANNEIEN

Ret-mat eo kaout un istor kaer da gontañ (storytelling) e liamm gant ar genad ma kaver Aurania Resources enañ, un embregerezh a reer ur « junior » anezhañ. E bal : kas furchadennoù er c'hondon betek kavout maenadoù. Ur wech m'int bet kavet e werzh neuze un aotre mengleuziañ, d'ur « major », a zo e bal eztenañ ar maenadoù, goude bezañ bet asant ministrerezh an Arc'hant hag an Industrierezh.

E chadenn boued bed ar vengleuzierien ez eo an embregerezhioù « junior » hag a gemer ar muiañ a riskloù arc'hant :

« Ret-mat eo kaout ur blanedenn a-zoare evit dont a-benn d'ober ur vengleuz diwar al lec'h bet diskoachet », a resisa Williams Sachers.

Gant an embregerezhioù « junior » e vez savet martezeadennoù diwar pezh a vo kavet er c'hondon, met hir e vo a-raok ma vefe tapet ganto roadennoù a c'heller fiziañ enno da vat. Etre tri ha c'hwec'h vloaz evit kas da benn an dielfennadurioù klok. Pezh a ra seizh vloaz ha seizh-ugent evit ar gevranneien.

Evit-se, evel ma tispleg ar sokiologourien Brice Laurent, e Mengleuzioù ParisTech, ha Julien Merlin, er CNRS, en o fennad-skrid « L'ingénierie de la promesse : le renouveau minier et la mine responsable » (Ijinouriezh ar bromesa : nevezadur ar mengleuzioù hag ar mengleuzioù kiriek)⁷ : « *diasur eo ar c'havadennoù geologel, ne roont tro d'ar juniores da*

7] « L'ingénierie de la promesse : le renouveau minier et la mine responsable », B. Laurent, J. Merlin, Natures Sciences Sociétés, volume 29, 1añ a viz Kerzu 2001

c'hellout priziañ resis ar c'hementadoù nemet diwezhat-tre, pezh a redia anezho da gendrec'hiñ koulz war elfennoù fetis ha war gomzoù kaer [...], diazezet eo neuze labour ar juniored war furchadegoù geologel ha kehentiñ war-zu ar gevranneien ».

UN EMBREGEREZH DIAZEZET E TORONTO HA MARILHET EN INIZI BERMUDEZ

Met a-dreñv an istorioù kaer e kaver ar wirionez plaen. E Toronto, er C'hanada, emañ sez sokial Aurania Resources, padal eo en inizi Bermudez ez eo marilhet war roll ar c'henwerzh⁸ hag an embregerezhioù. Keith Barron eo a chom e gevranneg pennañ, p'emañ gantañ 43 % eus ar c'hevrannoù, e-tal kevranneien all⁹ evel Haywood securities Inc, un embregerezh postañ arc'hant er C'hanada, gant 29 % outo, pe c'hoazh Citibank Kanada, ti-bank Kanadian zo gant 5 % outo.

Sklaer eo e bal¹⁰ : « diazezet eo ar furchadegoù mengleuziañ war an dibab, ar bonnañ pe ar prenañ tachennoù mengleuziañ ha furchañ en tachennoù-se a c'hellfe bout pinvidik en aour, kouevr, arc'hant ha danvezioù krai talvoudus all ».

Chom a ra e raktres pennañ mont da heul an hunvre bet boulc'het gant Keith Barron, mont war roudoù an aour en Ecuador. Ar raktres anvet « Lost Cities-Cutucu »¹¹ zo diazezet war 42 aotre

mengleuziañ war en tu all da 2.000 km². Ar furchadegoù a vez kaset en-dro e Breizh zo skouerius eus strategiezh rik an embregerezhioù « junior », hervez Brice Laurent ha Julien Merlin pa venegont komzoù prezidant ur « junior » bet goulennataet ganto e-doug o enklask¹² : « Liesaat ar raktresoù furchadegoù a ro an tu da vihanaat ar riskloù geologel, met ivez da gendrec'hiñ ar gevranneien e vo d'an nebeutañ ur gavadenn dalvoudus diwar an holl raktresoù. Ur junior ha ne lakfe arc'hant war ur raktres hepken ne vefe ket soñjet outi evel un embregerezh a c'hellfer kaout fiziañs ennañ war marc'hadoù an arc'hant. »

Ur soñj bet gwiriektaet gant Breizh Ressources : « An embregerezhioù junior a zo evel ur start-up e bed an enklask medisin pe evit krouiñ vaksinoù nevez : ret eo dezho disachañs tud gant arc'hant hag ober labourioù enklask evit kavout traù d'ur poent bennak. »

AR GEOLOGOUR A DAG AR C'HONDON E BREIZH

Goulennet en deus ar geologour tres Indiana Jones gantañ an aotre da furchal ar c'hondon e Breizh, dre an embregerezh Breizh Ressources, war-glask aour hag un daou-ugent maenad all c'hoazh. Ha war-se e kont Keith Barron un istor kaer ivez. Dihunet e vefe bet e tedenn evit Breizh e miz Even 2022, p'en

8] « Statuts constitutifs de Breizh Ressources, société par action simplifiée », 11 a viz Gwengolo 2023

9] « Aurania Resources Ltd, condensed interim consolidated financial statements », 2024

10] « Exploration focus », lec'hienn internet Aurania, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

11] « Geology and exploration potential », lec'hienn internet Aurania, pajenn web bet gwelet e miz C'hwevrer 2025

12] « L'ingénierie de la promesse : le renouveau minier et la mine responsable », B. Laurent, J. Merlin, Natures Sciences Sociétés, volume 29, 1añ a viz Kerzu 2001

doa klevet kaoz e oa diskouezet e Mirdi Broadel Istor Naturel e Pariz standilhon ar valzenn vrasañ bet diskoachet er Frañs¹³. Ur valzenn aour eo, 3,3 kg outi, bet diskoachet en Henbont (56), hag enni 1,1 kg aour (mesket gant kouarz), ha bet prenet gant Bank Frañs e 2022 evit bezañ lakaet war ziskouez er mirdi. Displegañ a ra neuze e oa aet e skipailh e darempred gant ar mirdi evit klask gouzout muioc'h. Ha klevet en defe neuze e oa bet meneget ar valzenn-se e Kazetenn ar Mor-Bihan e miz Gouere 1875 gant ar gerioù-se : « *Micherourien a veze o terriñ mein war an hent-bras a gas da Gervignag. Unan anezho, un tamm kaletoc'h evit ar re all, a voe taolet er c'hleuz gant ar c'hantonier [...] an tamm maen-se, deuet diouzh ur vengleuz kouarz, a oa ennañ ur wazhienn aour bras a-walc'h, a vefe e priziet en tu all da bemp kant lur anezhi, hervez un arbennigour.* » Goude-se, hervez ar geologour bepred, en defe kejet gant unan bennak e miz Even 2023 en doa kendrec'het anezhañ da gas enklaskoù da benn e Breizh. En em gavet e vefe bet Keith Barron gant un diskouezher (a fell dezhañ chom dizanv) e saloñs maenadoù Itron-Varia ar Mengleuzioù, en Elzas, hag en defe bet diskouezet dezhañ ur standilhon doareoù damheñvel diouzh an hini a weler e Mirdi an Istor Naturel, ha bet

kavet e korn-bro an Henbont ivez.

Douetañs ebet ken gant ar geologour : ret eo dezhañ mont da furchal e kondon Breizh. Gwiriet eo bet gant *Splann !* pezh a denne diouzh an dud meneget en istor-se, ha gwir eo pezh a denn ouzh ar malzennoù aour. Padal, Mirdi an Istor Naturel a embann n'int ket aet e darempred gwech ebet gant skipailh Keith Barron.

Adalek miz Even 2023 eo aet an traoù war-raok. Savet eo bet Breizh Ressources gant an embregerezh Aurania Resources e miz Gwengolo 2023, hag ez eo Keith Barron e penn ar jeu. E bal : « *studi geologiezh, furchadeg an danvez maenadoù, studiañ ha kas war-raok an doareoù disaotrañ, tretiñ ha talvoudakaat al lastez mengleuziañ kozh* ».

Diouzh an 21 a viz Gouere 2023, pa oa c'hoazh Breizh Ressources war-sevel, e oa bet fiziet ur goulenn aotre furchadegoù mengleuziañ kentañ, anvet « Epona »¹⁴, a bled gant kumunioù Kervignag, Lostenk, an Henbont ha Langedig. Hag un eil goude-se, d'ar 5 a viz Here 2023, « Bélénos »¹⁵, war un dachenn 440 km², war zaou zepartamant ha 18 kumun.

Evit echuiñ, d'an 11 a viz Here 2023, « Taranis »¹⁶, war 360 km², tri departamant hag 20 kumun. Evit pezh a sell an notennigoù efedoù a dalvez da briziañ

13] Kemennadenn d'ar gazetennerien, « Aurania Resources Applies for Exploration License in Brittany, France », Keith Barron, 24 a viz Gouere 2023

14] « Demande de permis exclusif de recherche de mines (PERM) Epona » bet kaset da vinistr an Ekonomiezh, 21 a viz Gouere 2023

15] « Demande de permis exclusif de recherches de mines (PERM) Bélénos » bet kaset da vinistr an Ekonomiezh, 5 a viz Here 2023

16] « Demande de permis exclusif de recherches de mines (PERM) Taranis » bet kaset da vinistr an Ekonomiezh, 11 a viz Here 2023

an efedoù a c'hellfe dont da heul an enklaskoù-se, savet int bet gant burev ijnouriezh ENCEM Gevred, ne bell eus Lyon, ha savet etre an 12 hag an 28 a viz Gouere 2023 [*lennit hor pennad Breizh Ressources, an embregerezh mengleuziañ didrousañ a vez er C'hornôg*].

Eus e du, Breizh Ressources a respont deomp n'eo ket ken prim ha se an traoù rak « *hon geologourien a zo interested abaoe pell dija gant douaroù Breizh* ». Hervezo ne oa ket tu mont buanoc'h betek poent abalamour ma « *n'eus ket kalz a youl gant ar bolitikerien* ».

« DON EO HENGOUN AR MENGLEUZIAÑ ER VRO-SE »

Met estreget an aour eo pal ar goulennoù aotre mengleuziañ-se. Astennet he deus Breizh Ressources he enklaskoù d'un daou-ugent bennak a vaenadoù all, en o zouez ar stibiom, ar staen, an titaniom, ar zirkoniom hag al lithiom. Hervez an teulioù ez afe 1,95 milion a euroioù hollad an enklaskoù-se, evit pezh a sell an div lodenn gentañ an tri PERM. Ha ma 'z eo skoulmet an afer e vo ret dezho postañ arc'hant ouzhpenn evit arc'hantaouiñ peurrest al labourioù. Evit-se emañ Keith Barron war-glask arc'hant ouzhpenn. Evel ma plij dezhañ lavaret en deus bet lakaet e arc'hant dezhañ e-barzh Aurania Resources : asantet en deus prestiñ 3 vilion a

zollarioù kanadian¹⁷ e 2023. Ingal e vez pedet ar geologour da doullañ kaoz en abadennoù er Stadoù-Unanet hag er C'hanada, war lec'hiennoù ispisializet skignet war ar rouedad, un doare evitañ da glask kendrec'hiñ tud a c'hellfe dont da bostañ o arc'hant en embregerezh.

Er videoioù-se e plij dezhañ « kontaden-niñ » e istorioù a Vreizh : ar valzenn ken souezhus he ment, pennadoù kazetennoù diouzh penn-kentañ ar c'hantved, pe c'hoazh mojenn Julius Kaezar en defe graet e fortun e Breizh a-raok distreiñ da Roma. Resisaat a ra zoken e vez enporzhiet en Europa metaloù klask bras warno, evel ar stibiom pe an nikel, pa glask « *ar c'hevandir kozh bezañ emren* ». Menegiñ a ra zoken eus ur font a 500 milion a euroioù bet lakaet e plas gant Emmanuel Macron¹⁸ evit skoazellañ ar postadurioù arc'hant er gennad-se. Ha gwir eo, ur font a zo, gouestlet d'ar metaloù klask bras warno, bet krouet e miz Mae 2023, hag emañ ar Stag o kemer perzh ennañ, dre ar C'hef Fiziañ ha tredeogañ.

Lakaat a ra war-ziwall memestra n'eo ket aezet an difraeoù er Frañs¹⁹ : « *Un tamm evel ur «black box», ur voest zu eo, gant bureverezh e-leizh. Lonkañ a ra maread a amzer, met labourat a reomp gant ar pennadurezhioù. Perc'hennet eo ar c'hondon gant ar Stad, neuze e rankomp kaout an aotreegezh, pe un dra bennak a*

17] « Aurania Resources Ltd, condensed interim consolidated financial statements », 2024

18] Kemennadenn d'ar gazetennerien, « France 2030 : le Gouvernement annonce le lancement d'un fonds d'investissement dédié aux minerais et métaux critiques », ministrerezh an ekonomiezh, 11 a viz Mae 2023

19] Video « It's quite an astonishing piece » — Aurania's CEO Keith Barron, on a 46% Au historic gold specimen, Kitco mining, video bet gwelet war internet e miz C'hwevrer 2025

seurt-se, evit gellet mengleuziañ. »

Seder e klask en em ziskouez memestra evit pezh a sell ouzh disoc'h e c'houlennoù : « *Hir eo bet istor ar mengleuziañ er vro-se. Hag e pep lec'h e vez ezhomm krouiñ labour, neketa ?* » In fine, e c'heller en em c'houlenn ma n'emañ ket ar paotr o klask adober e daol kaer ha pakañ e varlennad un eil gwech, evel en Ecuador, pa lâre « *I am trying to do it again* » eus kreiz e galon.

Keith Barron a vez lakaet kalz war-raok e-barzh videoioù hag istor Aurania Resources. Gantañ eo bet sinet teulioù ofisiel ar PERM, hag eñ eo a vez o toullañ kaoz gant ar gevranneien. Met daou zen oberiant-kenañ a vez tro-dro dezhañ er Frañs : Jean-Paul Pallier ha Stefan Ansermet.

A-orin eus Breizh eo an hini kentañ, p'en deus tapet e ziplom e Skol-veur Brest ha kroget e vicher e BRGM Gwiana e 1995 a-raok dont da gemer perzh en Aurania Resources e 2009. Kuzulier ispisializet eo an eil, ha bet eo unan eus diazezerien an embregerezh. Ganto eo e vez douget raktresoù Aurania Resources er Frañs

dre Breizh Ressources : kendivizerien int ar strollegezhioù lec'hel tizhet gant an tri PERM hag ar c'hevredigezhioù war an dachenn [*lennit Breizh Ressources, an embregerezh mengleuziañ didrousañ a vez er C'hornôg*].

E dibenn 2024 e oa bet gwelet Jean Paul Pallier en ur gazetenn, en ur pennad anvet : « Breizh Ressources ur start up ha ne c'hounez gwenneg ebet »²⁰.

E Korsika ez eus bet klevet kaoz ivez eus daou genlabourer Keith Barron nevez zo, pa oa bet savet eno gant Aurania Ressources un embregerezh all damheñvel ouzh Breizh Ressources, Corsica Ressources²¹ : diazezet eo war al live lec'hel, padal ez eo Keith Barron ar c'hevrannek pennañ outañ. Du-se ez eo dedennet ar skipailh gant an nikel a gaver e bili hag e krouan div draezhenn er C'hab Korsikan.

Ne ouezer ket pezh a vo kavet gant ar geologour e kondon Frañs. Met un dra zo sur, war-glask emañ koulz maenadoù, avanturioù ha gloar !

Catherine Le Gall

20] « De Ruffiac à Guémené-Penfao : « Breizh Ressources est une start-up qui ne gagne pas d'argent » », Gwenaël Merret, Actu.fr, 16 a viz Here 2024

21] « U Levante s'alerte d'un potentiel projet d'exploitation du nickel des plages d'Albu et Nonza », Manon Perelli, Corse net Infos, 4 a viz Du 2024

Boest du

Respontet eo bet dre skrid deomp gant Breizh Ressources. Gallout a rit lenn o zestenn war hol lec'hienn internet : Splann.org.

Kabined ar ministr dileuriet evit an Industri en doa respontet dre skrid ivez. Gallout a rit lenn ivez o respont a-bezh war hol lec'hienn internet : Splann.org.

AN EMBREGEREZH MENGLEUZIAÑ DIDROUSAÑ A VEZ ER C'HORNÔG

Tri aotre dibar enklaskoù mengleuziañ (PERM) zo bet fiziet e Breizh gant an embregerezh Breizh Ressources, didrouz-kaer. Pledañ a ra gant un dachenn ledet war 42 kumun hag en tu all da 850 km² koulskoude. Ha daoust m'eo dallet trowardroioù ar raktres, en em vodet eo ar geodedourien evit mirout ma vefe kaset al labourioù war-raok.



Julia Giordano

- 】 Tri aotre enklaskoù mengleuziañ etre Breizh hag ar Maine-ha-Liger zo bet fiziet gant ar start-up Breizh Ressources etre miz Gouere ha miz Here 2023. Met lakaet eo bet a-wel d'an holl e deroù 2024 nemetken.
- 】 « Dre zegouezh » eo bet diskoachet an tri aotre gant ar c'hevredigezhioù ha gant tud ar vro a zo en em strollet evit enebañ ouzh ar furc'hañ hag ouzh pezh a c'hellfe dont da vezañ mengleuzioù da zont.
- 】 Gant ministrerezh an Arc'hant hag an Industrierezh eo bet roet an aotre mont war-raok e dibenn 2024, padal gant un devarnadurezh nevez ez eo gorrekaet ar mont en-dro.

Dre zegouezh eo, pa oa o lenn ar *Gazetenn Ofisiel* eus an 10 a viz Genver 2024, e oa bet Dominique Williams, arbennigour war ar mengleuzioù er gevredigezh Dour ha Stêrioù Breizh, o tegouezhout gant ur c'heloù tarzhus : un nebeud mizioù a-raok, un embregerezh anvet Breizh Ressources he doa fiziet ur goulenn aotre enklaskoù mengleuzian (PERM) anvet « Epona »¹ e peder c'humun eus ar vro.

En Oriant eo staliet ar start-up savet a-ratozh evit an degouezh ha gant Aurania Resources da gevranneg nemetañ, an embregerezh kanadian-se bet marilhet en Inizi Bermudez ha renet gant Keith Barron, ur geologour brudet evit bezañ bet diskoachet unan eus brasañ mengleuz aour er bed [*lennit hor pennad Aotre enklaskoù mengleuzian : un Indiana Jones ar c'hiz nevez o klask aour e Breizh*].

Raktal eo bet ar stourmerez o lakaat ar gevredigezh war ziwall, ha setu kaset ganto ul lizher da brefeti Mor-Bihan, ken abred hag ar 16 a viz Genver, kement ha gellet lenn an teuliad. Daou zevzh war-lerc'h e oa bet kaset ur postel d'ar strollegezhioù lec'hel evit kelaouiñ

anezho e oa bet fiziet ganto teuliad ar PERM : « *D'ar Gwener 19 a viz Genver e oa, diouzh tro e oan, ha erruet e oa Jean-Paul Pallier ha Stéphane Ansermet eus Breizh Ressources da zont da welet ac'hannon da ginnig o raktres din* », eme Elodie ar Floc'h, maerez Kervignag (56).

D'an 22 a viz C'hwevrer e oa bet aozet un emvod gant an is-prefed, diwar c'houlenn an dilennidi, kement ha reiñ resisadurioù war an teuliad : « *Souezhet e oamp un tamm dre ma oa bet savet ar goulenn e miz Gouere 2023 ha n'hon oa bet tamm keloù ebet betek neuze* », eme Michèle Dollé, maerez an Henbont, souezhet c'hoazh.

Ken didrouz all e oa bet an daou deuliad PERM a vez graet outo « Taranis »² ha « Bélénos »³, hag a bled gant ul lodenn eus ar Mor-Bihan, an Il-ha-Gwilen hag al Liger-Atlantel.

Jeannick Martel, eil-maerez er Chapel-Braen (35) n'oa bet klevet kaoz eus ar goulenn PERM « Taranis » a zo war he c'humun, e miz Gouere 2024 nemetken, da geñver ur c'huzul-kêr : « *kaset e oa bet ur postel d'an ti-kêr gant ar prefeti evit kelaouiñ anezhañ e vefe loc'het un enklask foran. Douetañs hon oa war ar mare ma oa erruet, dre ma oamp e-kreiz an hañv,*



1] « Demande de permis exclusif de recherche de mines (PERM) Epona » kaset da vistr an ekonomiezh, 21 a viz Gouere 2023

2] « Demande de permis exclusif de recherches de mines (PERM) Taranis » kaset da vistr an Ekonomiezh, 11 a viz Here 2023

3] « Demande de permis exclusif de recherches de mines (PERM) Bélénos » kaset da vistr an Ekonomiezh, 5 a viz Here 2023

mare an dilennadegoù evit ar gannaded e oa. Ne oa aes nag ober bruderezh na sevel un diviz war ar raktres », emezi.

Evit pezh a sell ar goulenn aotre « Bélénos », bet fiziet e miz Here 2023, diskoachet e oa bet ha lakaet war-wel d'an holl dre ur pennad gant *Ouest-France* diouzh ar 16 a viz Mae 2024⁴, hag a gonte an diviz war an danvez-se e kerzh kuzul Anjou Bleu Kumuniezhioù.

N'EUS KET PEADRA DA BENNFOLLIÑ, PA LENNER AR STUDI WAR AN EFEDOÙ

Petra a ouezer e gwir diwar-benn ar goulennoù aotre PERM bet fiziet ha chomet pell diouzh selloù an dilennidi hag eus an dud ? Pa lenner an teuliadoù e c'heller gwelet eo bet fiziet an hini kentañ anezho, anvet « Epona », ledet war 51 km² war peder c'humun er Mor-Bihan, d'an 21 a viz Gouere, pa oa c'hoazh en embregerezh Breizh Ressources war-sevel.

An eil, anvet « Bélénos », a oa bet fiziet d'ar 5 a viz Here 2023. Ledet eo war 440 km², war zaou zepartamant, 18 kumun. Erfin, an trede hini, « Taranis », a zo bet fiziet d'an 11 a viz Here 2023, a zo ledet war 360 km² war ugent kumun, tri departamant, div rannvro. En holl : 42 kumun hag en tu all da 850 km² e

kont da lâret eo 17 gwech kêr Roazhon. E gwir ez eo ur goulenn evit un aotre mengleuziañ, da lâret eo ez eo bet diskoachet gant Breizh Ressources an takadoù a c'hellfe degas gounidoù dezho, abalamour ma c'hellfent tennañ ha gwerzhañ maenadoù, met da gentañ-penn e rankont kas da benn studioù don war ar c'hondon, evit ma ouifent da vat pezh a gaver ennañ.

Evit-se e oa bet fiziet goulennoù evit tri aotre mengleuziañ evit pemp bloaz, a c'hell bezañ adnevezet : « *Gant ur PERM e taper ur gwir font war an danvezioù hep na vefe aotreet ar mengleuziañ [...] Merket eo gant ur prantad amzer bevnet, un takad bevnet, ul listennad danvezioù da*

glask resis, deskivadur an enklaskoù emañ en-sell da gas war-raok, hag an heuliadenn outo », a resisa kabined ministr an Industriezh.

Ledan a-walc'h eo tachenn an tri aotre bet fiziet gant ar « junior »

(da lâret eo an embregerezh enklask) : war-glask metaloù strategek emañ, da skouer ar stibiom, ar zirconiom, an douaroù rouez pe an tungsten, met ivez maenadoù klaseloc'h eget an arc'hant pe an aour.

Netra da vout nec'het, pa seller ouzh an teuliadoù. Hervez ar studi war an efedoù, bet kaset en-dro gant ar c'habined ENCEM, diazezet e Venissieux, e-tal da Lyon, ez eo doujus an teknikoù

**Hervez Breizh
Ressources
e-tre 1 % ha 5 %
eus ar raktresoù
a vo eus ur
mengleuz ganto
war-lerc'h.**

4] « Y aura-t-il prochainement des recherches de métaux précieux en Maine-et-Loire ? », Emmanuel Esseul, *Ouest-France*, 16 a viz Mae 2024

« Gwech ebet n'eo bet laouenoc'h ur vro goude ma vefe bet toullet mengleuzioù enni. »

a vez implijet, evel an eztennañ standilhonoù, pe implij un askell-tro evit muzuliañ ar maezioù tredan-warellek, pe c'hoazh lakaat elektrodennoù en douar, ha n'o do efed negativel ebet war an endro.

Ha forzh penaos, eme Jean-Paul Pallier, dileuriad Breizh Ressources er Frañs, n'eus ket kalz chañsoù e vefe frouezhus an enklaskoù-se. Hervez an testoù niverus hon eus bet tro da gejañ ganto, pe e vefent dilenni-di pe izili kevredigezhioù, frealzus e vez bepred Jean-Paul Pallier pa lâz dezho ez eus nebeut-tre a chañsoù

da gavout maenadoù a dalvezo ar boan eztennañ anezho, hag alese, n'eo ket dav pennfolliñ. E-keñver an dra-se e lâz Breizh Ressources n'eus nemet e-tre 1 ha 5 % eus ar raktresoù enklask a vo eus ur mengleuz ganto war-lerc'h.

En ur pennad eus *Ouest-France* eus miz Ebrel 2024⁵, Stéphan Ansermet, a vez graet outañ unan eus renerien an embregerezh Breizh Ressources e-tal da Jean-Paul Pallier (e gwirionez int implijidi eus Aurania Resources), a gloz ar gaoz evel-se : « *ha ma n'eo ket toullet ar mengleuzioù, gouest e vo ar rummadoù da zont da c'houzout peseurt danvezioù mein a gaver er c'hondon* ».

Enklaskoù a dalvezo, d'ar gwashañ, evit hor bugale pe hor bugale vihan neuze.

P'ho neus savet goulennoù da Breizh Ressources eo bet respontet deomp « *ez eus bet lakaet kalzig a nerzh evit bezañ treuzwelus war an afer* ». D'an embregerezh d'ober al listennad eus an holl emgavioù bet graet gant ar ganaded ha gant ar c'hevredigezhioù : « *aozet eo bet an traoù gant ar prefeti, met evit poent n'eo ket kroget tamm ebet ar raktres forzh penaos* ».

5] « On pense qu'il y a un potentiel de métaux stratégiques » : ils veulent explorer le sol du Morbihan », Guillaume Chassaing, *Ouest-France*, 12 a viz Ebrel 2024



**ENEBIEZH TUD AR C'HARTER :
UN GWALLHUNVRE EVIT
AN EMBREGEREZHIOÙ
MENGLEUZIAÑ**

War a seblant ez eo dreist-holl un doare da gehentiñ a glask frealziñ an dud. Rak enebiezh ar c'humuniezhioù lec'hel zo ur gwallhunvre evit an embregerezhioù mengleuziañ : gelllet a ra gorrekaat an enklaskoù war-ober, sachañ a ra evezh ar mediaoù, nec'hiñ a ra an dilennidi, hag a-benn fin ar gont e lak anezho da goll un tamm mat a arc'hant.

Evit-se eo e plij d'an embregerezhioù mengleuziañ chom hepober trouz ha sachañ evezh an nebeutañ posupl. Memes ma n'eo ket a-du Breizh Ressources gant an dra-se : « ar c'hehentiñ a vez graet

**« Ezhommoù an dour
en ur vengleuz a
zegasfe freuz diremed
en hor bro. »**

gant ar Stad hag an deiziataer a vez dibabet gant ar prefeti ».

Aze koulskoude ez eo lakaet enk war an embregerezh Breizh Ressources evit an tri goulenn PERM-se : war ziwall e oa Dominique Williams e Dour ha Stêrioù Breizh, hag alese eo en em savet meur a

hini er vro.

« Ret eo bezañ war-evezh adalek bremañ evit mirout ouzh ar riskloù da erruout, ha lakaat un harp

d'ar mengleuziañ maenadoù en hor bro. Gourdrouz zo war hon tiriadoù gant ar PERMoù, rak gwech ebet n'eo bet laouennoc'h ur vro goude ma vefe bet toullet mengleuzioù enni », a ziabenn Dominique Williams

« En Il-ha-Gwilen n'eus ken met 3 % eus an dourioù a vefe e stad vat, ha gwashoc'h



Julia Giordano

c'hoazh el Liger-Atlantel, gant 2 % outo. N'eus ket kalz a zourioù dindan zouar, ha ret eo deomp ober gant an dourioù war-c'horre dreist-holl. Padal, gant tommadur an hin e vezomp ingal war evezh ouzh ar sec'hor. Hag ezhommoù an dour en ur vengleuz a zegasfe freuz diremed en hor bro », a zispleg Pauline Pennober, animatourez Dour ha Stêrioù en Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel.

Evit-se ez eo bet ar gevredigezh o sezi-zañ an teuliad raktal p'eo bet kelaouet ma oa bet fiziet ar PERM Epona e miz Genver 2024. Kehentet he deus adalek he lec'hienn, aozet he deus emvodoù kelaouiñ, kejet he deus gant an dilennidi, kizidikaet he deus ar geodedourien war an dachenn pe adalek webinarioù.

« Klevet hon eus lâret e vefe eus un enklask publik un devezh a-raok ma vefe bet echu. »

Loc'het he deus gant ur c'houlzad bet amprouet dija : « *krog omp da gabaliñ evit lakaat an dud da nac'hañ digeriñ o zachennoù da enklaskerien Breizh Ressources. Gellet a ra perc'henned an tachennoù sinañ ur skrid lec'h ma embannont berzañ an digor d'o zachen. Evel-se ez el diaesaet mont en-dro an enklaskerien », a zispleg deomp Dominique Williams. Diouzh un*

tu all emañ ar gevredigezh o heuliañ a-dost al luskad geodedourien a vez o prientiñ ar stourm war an dachenn.

Evel e Santez-Anna Gwilen (35), tra-penn d'ar PERM « Taranis ».

« Loc'het eo bet gant ur strollad Whatsapp hag a vod kerent bugale. Klevet hon eus lâret e vefe eus un enklask publik un devezh a-raok ma vefe bet echu. Emskiantet omp bet neuze e oa divent tachenn ar

PERM, padal e oa an embregerezh o klask luziañ an afer en ur lâret ne oa ken met un enklask hep na dennfe da vras, a gont deomp Olivier Lemoyne, ur penturer o chom er gêriadenn. Raktal hon oa divizet sevel follennoù-nij, ha mont war ar marc'had da gas keloù d'an dud. Goude-se hon eus oazet un emvod e Landegon, e miz Here 2024, pa oa deuet 250 den, Mathilde Hignet, kannadez Il-ha-Gwilen en o zouez. Bremañ e klaskomp sevel ur rouedad rannvroel gant stroladoù lec'hel er c'humunioù tapet en afer. »

Hevelep tro-spered er Chapel-Braen (35) e miz Gouere 2024, pa oa bet diskoachet gant an eil-mae-rez Jeannick Martel e oa loc'het gant an enklask publik ha fiziet ar goulenn aotre PERM « Taranis » en hevelep tro. Sachet he deus evezh an dilennidi war an afer, met ne ziskouezent ket bezañ nec'het kement-se : « Lâret o deus bet din e oa ret leuskel an traoù da zont, ha ne oa nemet nebeut-tre a chañsoù e vefe bet kavet un dra bennak ».

N'O DEUS KET KALZ A BOUEZ AR STROLLEGEZHIOÙ LEC'HEL EN AFER AR MENGLEUZIAÑ

Ar gevredigezh lec'hel La Feuille n'eo ket ali gant an dilennidi-se. Tapet he deus krog en afer, ha tennet gounid diouzh barregezh prizius Jean Baranger, war e leve bremañ, en doa bet labouret war dachenn ar vragigerezh luks hag a anvez mat dalc'hoù ar mengleuziañ. Hervezañ e vefe an embregerezh

« Ma n'hell ket klask Breizh Ressources dre amañ ez int d'ober lec'h all. »

Breizh Ressources o klask aour da gentañ-penn, daoust m'eo bet astennet o goulenn aotre mengleuziañ d'un ugent bennak a maenad all : « pa lenner an teuliadoù e weler splann eo bet lakaet war-wel meur a dakad troet war an aouregi. Ha n'eo ket souezh kement-se : aet eo feur an aour war-gresk er bloavezhioù diwezhañ. E 2021 e kouste 45.000 € ar c'hilo, pa dizh 75.000 € hiriv an deiz. Ker-ruz eo erru, ha talvez 'ra ar boan toullañ don neuze. Gwechall e veze toullet betek 300 metrad donder evit eztennañ maenadoù 2g aour dre donenn enno. Hiriv an deiz e ranker mont betek 600 metrad donder evit ma chomfe lañsus ».

A-du emañ meur a zen gant an displegadenn-se, met Breizh Ressources a lâre bezañ intereset gant aour hepken : « O klask war-lerc'h meur a vetal emamp. Ar fed ma vefe eus aour eo ur sin vat evit

kavout traoù all ivez. Hon fal a zo souten industriezh ar vro hervez ezhommoù ar metaloù a zo ».

Evitañ ez eo sklaer an traoù: evit mirout ouzh ar mengleuziañ, ret eo stourm ouzh ar c'hlask. « *Lâret eo bet din gant Jean Paul Pallier, ma n'hellont ket klask dre amañ ez int d'ober lec'h all* », eme Jean Baranger. Loc'het eo al luskad, ha krog ar geodedourien d'en em sevel. Darn vras an annezidi enebet ouzh aotre ar raktres Taranis zo bet en em vodet er strollegezh « Stop Taranis », hag un emgav zo war ar stern evit deroù miz Genver 2025.

Ar gevredigezh Frañs-natur-endro Liger-Atlantel, diouzh he zu, a soñj ganto n'eus mall ebet evit poent : « *Ne dalvez da seurt ebet enebñ bremañ. Studiet eo bet an teuliad ganeomp, kejet hon eus Jean-*

Paul Pallier, ha pezh zo bet dezastumet ganeomp eo : ne dalvez ar goulennoù aotre-se nemet da zerc'hel ganto live o labour. War evezh e chomomp, met evit lâret ar wirionez ez eo gwelloc'h deomp mirout hon nerzh evit stourmoù all », a lâr deomp trumm Xavier Metay, kenurzhier.

Diouzh o zu e chom an dilennidi war evezh. Ar re a vez tizhet gant an aotreoù « Taranis » ha « Bélénos » a glask en em genaozañ evit gallet komz a-unvouezh, e-keit m'emañ an teir pe peder c'humun eus ar Mor-Bihan tizhet gant an

aotre « Epona » (Lostenk, An Henbont ha Kervignag) a embann dizaon o enebiezh. Ar c'huzulioù ti-kêr o deus votet dre vras a-enep d'ar raktresoù e-tre miz Mae ha miz Even 2024.

Disheñvel eo ali Laurent Duval, maer Langedig (56) : « *ma 'z eus danvezioù dindan hon treid e vint talvoudus evit ar rummadoù da zont* », emezañ e miz Mae 2024 en ur pennad eus *Ouest-France*⁶. Ur sell disheñvel eta, evel pezh a c'hoarvez e takadoù all : enebet eo dilennidi zo pa vez re all o komz e anv ar souvereñiezh an energiezh.

Forzh peseurt e vefe o sav-poent, n'eo ket gwall vras o fouez en divizadur : gant ar Stad, dre vinistrezh an Arc'hant

hag an Industriezh, emañ ar ger diwezhañ. Keuz he deus Michèle Dollé eus An Henbont : « *N'hon eus plas ebet da gaout er mont-en-*

« Ma 'z eus danvezioù dindan hon treid e vint talvoudus evit ar rummadoù da zont. »

dro-se, ne vestroniomp seurt ebet. Ne ouezomp ket da beseurt mare e vo roet ur respont deomp ha n'hon eus tamm keloù ebet war disoc'hoù an enklask publik. Lakaet omp er-maez, ha dav eo deomp mont da glask ar c'heloù a-benn gouzout e-men eo erruet an teuliad », a ouzhpenn Elodie ar Floc'h, maerez Kervignag (56).

Moarvat e vo gouezet muioc'h gant pezh he deus graet kannadez Frañs Disuj pedervet rann Il-ha-Gwilen, Mathilde Hignet : « *Galvet 'm eus ministr an ekonomiezh dre ul lizher bet*

6] « Le maire de Languidic favorable au permis de recherches minières », *Ouest-France*, 25 a viz Mae 2024

kaset dezhañ d'ar 26 a viz Here 2024 evit goulenn digantañ treuzkas ha reiñ d'an holl da lenn sintezenn an enklask publik bet graet e-doug an hañv, met ivez ali ar melestradurezhioù publik a oa bet savet ar goulenn outo da geñver stern imbourc'h ar goulennoù. Ret eo d'an dud gellet lenn an titouroù-se. Tamm respont ebet diganto abaoe koulskoude », emezi c'hoazh.

**AR STOURM OUZH
VARISCAN MINES :
« UR SKOUER HAG
A RO SPI DEOMP »**

Fiziañs he deus Dominique Williams eus Dour ha Stêrioù Breizh e pezh a vo disoc'h al luskad enebañ. Evel darn vras an dud e metoù ar c'hevredigezhioù he deus bet kemeret perzh er stourm ouzh an embregerezh Variscan Mines, ha laouen eo bet gant an disoc'h : « *E-doug en tu all da bemp bloaz hon eus stourmet e Breizh a-enep ma vefe aotreet tri PERM en un takad damheñvel, ledet war un 70 kumun bennak. A-benn ar fin, goude kement a dabut, Variscan Mines he deus kavet gwelloc'h dilezel an traoù e 2019. Gant ar skouer-se en hon penn e talc'homp holl ar spi », emezi.*

Evit poent e kendalc'h an enebiezh ha moarvat e vo skoazellet en ur mod

dic'hortoz. Gant ministrerezh an Arc'hant hag an Industrierezh eo bet lakaet *Splann !* war evezh war ar fed e oa en em silet un elfenn nevez e mont endro studi ar PERMoù. Betek-henn e oa trawalc'h fiziañ ur goulenn PERM, met abaoe an 10 a viz Gouere 2024 eo aet war-raok an devarnadurezh, ret eo bremañ d'ar raktresoù bezañ dindan asant ur prizadur war an endro.

« *Goulennet en deus ar ministr digant ar goulenner ma vefe klokaet e deulidoù, na neuze eo bet sezizet an Aotrouniezh war an endro diwar-benn an tri goulenn-se, evit ma c'hellfe reiñ e ali dindan tri miz. Hervez an ali a vo roet e c'hello bezañ klokaet an teuliad gant ar goulenner ma vez ret », a resisa ar ministrerezh. Ouzhpennañ a reont : « *Ur c'houlennaoueg foran dizanvezel ouzhpenn a vo aozet war lec'hienn ministrerezh an Ekonomiezh. »**

Rak-se, ne vo ket roet diviz ar ministrerezh e dibenn 2024 evel ma oa sañset, e-doug 2025 kentoc'h. Keuz en doa dija Keith Barron, rener Breizh Ressources [*lennit hor pennad 4*], o welet pegen gorrek e oa melestradurezh ar Frañs, bremañ e ranko diskouez kaout pasianted ouzhpenn c'hoazh.

Catherine Le Gall



Lakit hoc'h anv a-benn degemer al lizher-kelaouiñ !

Dedennet oc'h gant ar pezh a c'hoarvez er vro ? Gant an endro hag al labour-douar ? C'hoant 'peus bezañ titouret pa 'vez embannet un enklask gant *Splann!*? Gall a reoc'h heuliañ ha souten ac'hanomp en ur lakaat hoc'h anv a-benn degemer hol lizher-kelaouiñ bep miz war www.splann.org

Klevet 'peus kaoz eus Splann ! ?

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet.

Erruet eo *Splann !* d'ur mare eo diaesoc'h diaesañ ar jeu evit ar gazetennerien. E Breizh, ouzhpenn 500 kazetenner o doa sinet ul lizher digor kaset d'ar rannvro e 2020 : ganto e oa bet embannet sklaer ez eus diaezamantoù bras evit titouriñ mat an dud diwar-benn industriezh gounez-vouedel ar vro. Kement se a zo, evel-just, chalus-tre evit ar geodedourien. Soutenet eo bet al lizher-mañ gant 50.000 a dud. Kazetennerien 'vez paeet gant *Splann !* a-benn kas enklaskoù don war an hir-dermen. Pep tra a-drugarez d'ar re a harp ar gevredigezh. Embannet e vezont digoust war he lec'hien ha gant mediaoù a genlabour gant *Splann !*

Ur media dizalc'h...

Muioc'h mui e teu da vezañ mediaoù gall e daouarn tiez-bank hag embregerezhioù bras. Ar c'hontrol-mik a vez graet gant *Splann !* Arc'hantaouet e 'vez an enklaskoù gant ar geodedourien 'zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ.

Tost an holl arc'hant 'vez tapet gant *Splann !* 'zo bet roet gant an dud, en linenn pe dre chekenn. Gall a ra ivez bezañ arc'hantaouet gant kevredigezhioù all a zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ, pe gant yalc'hadoù 'zo. Met ne 'vez ket degemeret arc'hant na digant embregerezhioù, na digant strolladoù politikel, na yalc'hadoù digant strollegezhioù lec'hel. Gant *Splann !* 'neus ket na perc'henner pinvidik na bruderezh na kevrannegerien (actionnaires, en galleg). Ur c'homite evezh a ra war-dro eus pelec'h e teu an arc'hant a-benn ne yafe ket a-enep karta embann *Splann !*

... hag a zifenn an enklaskoù war an hir amzer

Aet eo da vezañ primoc'h-primañ bed ar c'heleier. Ganeomp-ni 'vez difennet ur c'hazetenniñ war an hir-amzer a-benn lakaat ar gaoz war sujedoù kizidig e Breizh. O chom er vro emañ kazetennerien *Splann !* Eus Naoned betek ar Gerveur ha Lannuon e 'vez furchet ganeomp a-drugarez d'an titouroù kaset deomp hag hon labour bemdez.

Krediñ a reomp o 'deus ezhomm ar geodedourien eus enklaskoù don ha sirius a-benn ober o soñj dezho war ar bed. Un doare da reiñ ostilhoù a-benn kompren enkadenn sokial, an endro hag an demokratelezh.

Gwriziet mat eo *Splann !* E Breizh. Anat eo e 'vez soutenet ar brezhoneg a zegas pinvidikaez hag ur sell disheñvel en hol labour. An holl enklaskoù 'vez embannet en div yezh d'an nebeutañ.

Adkavit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial :



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

Ur stumm kevredigezhel

Splann ! 'zo ur gevredigezh lezenn 1901 hag eo dreist-holl dre dud a-youl vat ez a endro. En holl, 25 den ouzhpenn 'zo abaoe eo bet krouet *Splann !*, tro-dro da 15 anezho 'zo kazetennerien. Setu an dud a gemer perzh en emvodoù-meur hag o 'deus droet da votiñ. Klask a reomp e vefe ar muiañ demokratel posubl mont en-dro ar gevredigezh. Gant ar c'huzul embann 'vez dibabet sujedoù an enklaskoù hag ar gazetennerien a vo o labourat warno. Gant ar c'huzul-se vez roet skoaz ouzh ar gazetennerien 'zo oc'h enklask. Mont a ra ivez en darempred gant ar mediaoù a embanno pe skigno ar pennadoù. Kazetennerien a-vicher indi ar re a gemer perzh er c'huzul-embann. Dilennet e vezont gant izili ar c'huzul-merañ hag, izili ar c'huzul-surentez.

Gant kazetennerien pijisted 'vez graet an enklaskoù 'zo bet dibabet gant ar c'huzul embann.

Ober war-dro mont-endro *Splann !* a vez graet gant ar c'huzul-se. Pep dilennad a zo par d'ar re all a-fed pouezh ha kargoù. Gant bodad-meur ar gevredigezh e vezont dilennet.

Lennit hon enklaskoù diwezhañ war splann.org

- *Breizh : c'hwezh an amoniak er maez*, Caroline Trouillet, miz Even 2021
- *Iberdrola. Pa vez louz ar jeu gant an energiezh « naet »*, Itzel Marie Diaz, Lena Lopes, miz Meurzh 2022
- *Metan : Bec'h d'an atant*, Julie Lallouët-Geffroy, Raphaël Baldos, miz Gwengolo 2022
- *Essure : drouk mouget e korf ar merc'hed*, Juliette Cabaço-Roger, Faustine Sternberg, Guy Pichard, Rozenn Le Carboulec, miz Here 2022
- *Moc'h fall*, Inès Léraud, Kristen Falc'hon, Floriane Louison, miz Gouere 2022
- *Brezel ar parkeier*, Julie Lallouët-Geffroy, miz Gwengolo 2023
- *Cooperl : enklask war un embregerezh pemoc'h ramzel*, Kristen Falc'hon, Ivan Logvenoff, miz Du 2023
- *Keuzioù ha girzhier en arvar*, Yann-Malo Kerbrat, Nolwenn Weiler, C'hwevrer 2024
- *Klañv eo porzh Sant-Nazer gant e industriezhioù*, Samy Archimède, Itzel Marie Diaz, Gwengolo 2024
- *Mengleuzioù pistrius e Breizh*, Célia Izoard, Morgan Large, Catherine Le Gall, miz Du 2024
- *Aodoù Breizh : temptadur ar betoñs en arvor*, Jérémie Szpirglas, Denis Vannier, miz Genver 2025

Ezhomm 'neus ac'hanoc'h Splann !



► A-benn goprañ kazetennerien, tresourien, fredoù-hent hag all 'neus ezhomm ac'hanoc'h *Splann* ! Evit poent eo bet arc'hantaouet hag embannet pevar enklask a-drugarez d'ho tonezonoù.

► M'ho 'peus c'hoant e vefe kendalc'het da vevañ ar c'hazetenniñ dizalc'h e Breizh, harpit ac'hanomp !

Gall a reoc'h reiñ el linenn war www.splann.org pe dre chekenn :

« Da *Splann* ! » eo dav deoc'h skrivañ war ar chekenn ha kas anezhi da *Splann* !,

3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Titouroù da gas deomp ?

Titouroù pouezus evit ar gevredigezh 'zo ganeoc'h ? Dokumantoù kizidig pe danvezioù e rankfe *Splann* ! enklask diwar o fennoù ?

Kasit deomp ur postel kentañ gant ur chomlec'h hep hoc'h anv (gant un anv fals ma karit) a-benn displegañ deomp eus petra 'zo kaoz berrha-berr. Gwelloc'h eo implijout posteloù evel Protonmail. Respontet 'vo deoc'h penaos ober evit kenderc'hel an tabut ha kas deomp an dokumantoù.

Mont en darempred

contact@splann.org

Splann !, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Splann !

Ti ar Vro
3, plasenn Maez ar Roue
22 200 Gwengamp

Penn renner an embann
Alain Goutal

Kazetennerien
Celia Izoard,
Morgan Large,
Catherine Le Gall,

Tresadenoù

Aurélie Calmet,
Julia Giordano

Bet heuliet gant

Juliette Cabaço-Roger,
Julie Lallouët-Geffroy,
Faustine Sternberg,
Caroline Trouillet

Laket brav gant
Anne Caillet-Leroy

Difazhiet gant

Julie Lallouët-Geffroy,
Caroline Trouillet

Troidigezh

Sten Charbonneau

Adlennet gant alvokadez
Claire Simonneau



Imprimeur Corlet
ZI Maximilien Vox
14 110
Condé-en-Normandie

Menegoù lezenn :
Eil trimiziad 2025
ISSN: 2800-664X
Bet embannet e miz Du
2024
Levrig n°8